

# inbouch'h

## KELAOUENN A STUDI

Notennoù diwar lenn  
"Kregin-mor"



Niverenn 227-228

31 Kerzu 1988

# IMBOURC'H, KELAOUENN A STUDI

Naontekvet bloavezh

Niverenn 227-228

31 Kerzu 1988

oooooooooooooooooooooooooooo

Notennoù diwar lenn : "Kregin-mor"	p.1
Treuzkaserezh ar feiz ha mammennoù ar feiz	p.35
Komz brezhoneg ouzh ar vugale	p.41
Notennoù a bep seurt	p.47
Petra eo an dasprenadurezh ?	p.53
Mari hag hon dasprenadurezh	p.58
Addispleg	p.61

oooooooooooooooooooooooooooo

Skodenn-vloaz : 150 lur. Y. Ollivier, 1 534 25 N Roazhon.  
E miz genver e vez paeet ar skodennoù, ha reiñ a reont  
ar gwir da zegemer ar gelaouenn e-pad ar bloaz ; e  
miz Gwengolo e vez paeet an adskodennoù, ha reiñ  
a reont ar gwir da zegemer stagadennoù ar gelaouenn.

Priz an niverenn-mañ evit ar re n'int ket emezelet  
e "Keneiled Imbourc'h" : 20 lur. E Breizh-Veur hag en  
Iwerzhon : £ 2. Embannet e vez "Imbourc'h" a-berzh  
ar gevredigezh "Keneiled Imbourc'h".

Niverenn-wask : 50 015.

Ar pennadoù a zo da gas da : Y. Ollivier, 8 leurgêr ar  
Marchiz, 56 230 Kistreberzh.

An niverenn-mañ a zo un niverenn ordinal.

oooooooooooooooooooooooooooo

Notennoù diwar lenn

gant Youenn OLIER

Niverenn miz Genver a zo prest hag a zeuio ermaez hep dale. Kavet e vo enni "Notennoù diwar lenn" e sigur oberennoù liesseurt hag ur pennad hir diwar-benn gwallheuliadoù Dispac'h gall 1789 e Breizh, gant Y.V. Bouëssel du Bourg, kerkoulz ha pennadoù a bep seurt.

An niverennoù war-lerc'h a vo gouestlet da adembannidigezh un oberenn wenedek eus deroù ar c'hantved; kant-hanter-kant pajennad bennak a vo enni, ha skeudennoù a vo kavet el levr-se.

Anaoudek-bras e vefemp ouzh izili "Keneiled Imbourc'h" ma kasfent hep dale ken o skodenn-vloaz evit 1989. O zrugarekaat a reomp en a-raok.

(-)(-)(-)(-)(-)(-)(-)(-)

Tro am eus bet da lenn e deroù ar bloaz, ha da adlenn er miz-mañ, miz Mae 1988, un oberenn nevez diwar bluenn Vaodez Glanndour: "Kregin-mor", bet embannet gant "Al Liamm" e dibenn ar bloaz 1987. Un oberenn hir-gortozet e oa, deuet er-maez war-lerc'h marv an oberour, siwazh, peogwir ez eo aet hemañ da anaon e miz Du 1986.

Un oberenn pouezus-dreist eo moarvat "Kregin-mor" e meur a geñver. Abaoe amzer "Walarn", marteze, ne oa ket deuet a-zindan ar wask, evit ar brezhoneger boutin, un dastumad a arnodskridoù a seurt gant hemañ. Gwir eo ez eus bet moulet gant "Preder" pe gant "Imbourc'h" testennoù diwar-benn politikerezh ha prederouriezh, hogen alies e oa anezho testennoù diouzh an dro, testennoù a gelaouenneriezh (ha va re-me a zo a seurt-se peurvuiañ). A-hend-all n'int ket bet skignet stank. An oberenn-mañ, en eneb, a zo bet savet a-ratozh ha dre hir-amzer, evit ur foran ledanoc'h eget hini "Imbourc'h"; dreist eo "Kregin-mor" zoken, er c'heñver-se, da oberennoù all a seurt ganti evel "Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh" ha "Canlyn Arthur" e kembraeg, a oa ivez dastumadoù pennadoù bet moulet er c'hazetennoù. Moarvat e felle d'an aozer ober eus an oberenn-mañ un doare testamant speredel ha politikel, ha rak-se en deus akedet keit all labourat warni.

A-raok komz eus danvez "Kregin-mor" avat e karfen ober un tamm displeg a-zivout ar stumm hag ar yezh anezhi.

Da gentañ, merkomp n'en doa ket pleustret ar skrivañner a-zevri war ar yezh-plaen abaoe pellzo, ha marteze abaoe ar brezel, p'en doa savet ur rummad studiadennoù a voe embannet gantañ e-barzh "Studi hag Ober" ha "Kaieroù Kristen". Gwir eo en doa roet da voulañ d' "Al Liamm" e droidigezhioù diwar ul lod eus levrennoù ar Bibl, hag ouzhpenn, testennoù a bep seurt e-barzh

an ugent kaier liestennet eus "Kaieroù Kristen" hag "Ar Bedenn evit ar Vro". Hogen relijiel e oa danvez ar pennadoù bet kevaotet dindan an talbennoù-se, hag hep bezañ kalvezel-rik, e chome an testennoù anezho arbennik a-walc'h; prim e vezent savet ha moulet ivez, diouzh an degouezh, ha skridaozet e vezent ivez ur yezh-plaen hep tamm 'arnoderezh' enni, yezh "Walarn" pe "Al Liamm" dre vras. Kement-all a c'hellfed lavarout a-zivout an troidigezhioù savet gant an aozer diwar oberennoù speredel ha relijiel gallek en doa fiziet ennomp e deroù ar bloavezhioù '80. Er c'hontrol, ha war ar poent-se e fell din dedennañ evezh al lenner, nevezet a-grenn ez eo bet yezh ar skrivagner en dastumad "Kregin-mor" nevez embannet gant "Al Liamm". A c'hell bezañ en dije Maodez Glanndour prientet, pe da vihanañ, empennet an 'notennoù'-mañ abaoe meur a zek vloaz, reoù anezho, da vihanañ, hogen peuzsur eo ez eo bet skridaozet pe adwelet ar pep brasañ anezho etre 1976 ha deroù ar bloavezhioù 1980. E devoud e hañval ar skrivagner bezañ kemmet en e levr diwezhañ e c'heriaoueg ha, zoken, betek ur poent 'zo, e frazennadurezh hag e stumm-skri-vañ. Moarvat e oa neuze koumanantet d'ar gelaouenn-mañ, ha kenlabourat a reas ganti zoken, peogwir, evel m'hon eus merket, e roas dezhi da voulañ un toullad skridoù a oa bet skridaozet gantañ gwerso, a gav din, rak ne vez ket santet levezon yezh "Imbourc'h" war ar pleusk anezho. Amañ, er c'hontrol, en ur stumm am-eeun, en em ziskouez al levezon-se; pa ran gant ar ger "ameeun" e vennan lavarout n'en deus ket Maodez Glanndour amprestet nemeur a c'herioù digant ar yezh arnevez a zo bet goveliet abaoe deroù ar bloavezhioù '70, un dousennad bennak anezho hepken, a gav din (da skouer, "bred", "amlegad", "eztaoliñ", "armerzh", h.a.) Kement-se n'en deus ket minet outañ a-hend-all a virout brizh-c'herioù gallek, sañset etrevroadel, evel "teknikel", "ekonomikel" [e-tal "armerzhel"], "metafizi- kel", ha me 'oar-me. Pezh a zo c'hoarvezet dreist-holl avat eo ez eo bet 'dihunet' ha 'dieubet', koulz lavaret, ijin-krouiñ ar skrivagner gant patrom ar yezh arnevez a gaver e-barzh "Imbourc'h", ur patrom hag a zo bet

burutellet gantañ a-wechoù en arnodskridoù-mañ, hep diazez ebet, a soñj deomp, eveljust! Da lavarout eo, n'en deus ket termet Maodez Glanndour da fardañ gerioù nevez, diwar elfennoù boutin peurvuiañ, avat, ha lod anezho, diwar zeverañ hepken, gant gourfenngerioù; ivez, n'en deus ket argilet da reiñ arsterioù nevez da c'herioù bet implijet endeo. El levr-mañ, en ur stumm adarre, en deus troc'het Maodez Glanndour, ar gorden-vegel en stage, n'eo ket hepken ouzh ur yezh poblek a zo, hogozik aet da get, hogen ivez ouzh yezh lennek "Walarn" (hag "Al Liamm"), an hini nemeti a oa bet arveret gantañ betek neuze. Notomp avat, n'eo ket kealiadoù nevez a fell d'ar skrivagner talvezout dre ar gerioù-se nevez savet gantañ: n'eus ket felllet dezhañ sevel ul levr kalvezel a brederouriezh; kentoc'h en deus esaeet, hep mont pelloc'h, reiñ muioc'h a resisted, a nerzhusted pe a verrentez d'e yezh, ar ger nevez o tont, a-wechoù, da gemer lec'h ul lavarenn pe ur rannlavarenn, evel ma c'hoarvez en alamaneg, lakaomp, pe c'ho-azh, hepken, da binvidikaat ar yezh dre vras. Forzh penaos, ne souz ket Maodez Glanndour dirak daouc'heria- doù a bep seurt, hag eñ oc'h ober a bep eil gant termennoù etrevroadel diouzh un tu: logikelezh (ur ger euzhus!), "metafizikel" (ken euzhus all, "fenomen", "koñsept", "koñsevet" h.a.); ha diouzh un tu all, gant gerioù 'gwalarnek' evel "arboellarezh" "diskouezataet", "tregorfoniezh" (krouet o-daou gant ar skrivagner daou-ugent vloaz a-raok), "meizad", "menoziad" pe "gealiad"; hag erfin gant ar gerioù "sadedek" deuet tre er yezh a-dal deroù ar bloavezhioù '70: "armerzh", "amlegad", "bred" h.a. Eveljust ne lavaran ket ne vefe ket tu da vurutellañ yezh hiron ar skrivagner er c'heñver-se, er c'hontrol. Gwell e vije bet dezhañ, da skouer, degemer ar ger sadedek "divez" (skiant ar vuhezegzh, diouzh reiñ ur finvez d'un ober) eget "emreizh", ur ger "gwalarnek" fardet gantañ abaoe pellzo, gwir eo, met a glotfe dreist-holl gant ar ger gallek "tempérance", lakaomp; ha ne fell ket din pouezañ war ar ger "moraliezh", hag a c'hellfe talvezout war un dro "divez", "divezelezh" pe hepmuiken "kentel da dennañ eus un darvoud pe ur



fed bennak". Hogen ar mennoz a felle din pouezañ warnañ dreist-holl eo en em ziskouez e tarzhadur pe e bleuniadur ar sevel-gerioù a arvester outañ el levr-mañ, ur seurt levenez-krouiñ ha n'en em ziskoueze ket en e oberennoù e komz-plaen, bet embannet gantañ a-gent. Savet em eus ur roll eus ar gerioù ha troiennoù nevez a zo strewet dre an oberenn penn-da-benn, ha na vefent ket kavet e-barzh "Geriadur Roparz Hemon": hama, ur c'hant bennak a vefe anezho, ma vefe kontet mat. Diwar ar roll-se e vefe merzet penaos en deus klasket Maodez Glanndour talvezout termennoù gallek 'zo, a-wechoù: "emdroadurour" evit "évolutionniste"; "gweladurour" evit "visionnaire"; moarvat, met klasket en deus ar skrivagner aozañ gerioù gant ur preder kenedoniel, mar geller lavarout, ha na glotont gant ger gallek ebet. Hep mar ebet, m'en dije gelllet Maodez Glanndour kenderc'hel da skrivañ, en dije gouezet arverañ ar yezh arnevez en un doare reizh, ha dilezet en dije, a gav din, ar gerioù sañset etrevroadel, evel "logikelezh", "moraliezh" "metafizikel" h.a., a chom, e gwirionez, ken stag ouzh ar galleg ma n'eus ket tu d'o arverañ e yezh all ebet. Krediñ a ran, ha se a fell din lavarout amañ, ez eo ur gwall fazi darbenn ar sañset "geriadur etrevroadel" e yezh ar brezhoneger desket, rak degas a ra ar yezh-se da heul ha dre ret, a bep seurt troiennoù hag ereadennoù gallek-rik. Gwir eo e kejer gant troiennoù gallek e-barzh lavarennoù brezhonek-rik a-wechoù: unan a seurt-se em eus notennet en oberenn-mañ end-eeun: "en e geñveriadur gant Doue" ha na c'heller kompren nemet dre an droienn c'hallek a glot gantañ; anat eo e oa ret implijout amañ, kentoc'h: "war-bouez en em geñveriañ ouzh Doue". Hogen aon am eus e vo kalz stankoc'h c'hoazh hevelep kammarveradurioù gallekaet gant ar gerioù sañset etrevroadel ha n'int anavezet gant ar vrezhonegerion, e gwirionez, nemet dre ar galleg.

Estreget gerioù gouiziek a gaver e yezh ar skrivagner en oberenn-mañ, ha gwell a se eo. Kavout a ra din en deus esaeet Maodez Glanndour pinvidikaat e vrezhoneg war-bouez ober gant gerioù poblek livus a-wechoù, evit tec'hout diouzh un akademegezh a c'hellje bezañ

seblantet sec'h ha krin a-wechoù. Ar preder-se da dizhout ur pleusk poblek gant gerioù rannyezhelel, hag int dibaot a-hend-all, a zo nevez ivez e yezh an tregeriad, - gerioù ha troiennoù a seurt gant "braeër-kaozioù", "faragouilhata", "strabouilhata" ha me oar-me.

#### Mennozioù ar skrivagner diwar-benn ar yezh

Hogen mat e vefe, dres, klask adkavout en oberenn ar skrivagner end-eeun e vennozioù diwar-benn ar yezh. E devoud, en deus gouestlet un toullad evezhiadennoù pe brederiadennoù d'ar c'hraf-se. O lenn anezho e soñjo unan e chom Maodez Glanndour hanter-hent etre "Gwalarn" ha "Saded" war dachenn ar yezh. Anzav a ra, moarvat, ne c'heller ket menel war live yezh ar bobl pa vez kel a skrivañ diwar-benn prederouriezh. Da skouer e tiskleir war ar bajenn 181: "Keit ha ma c'houlennomp digant ar sakrist pe ar garabasenn penaos skrivañ prederouriezh ne vo ket graet e brezhoneg araokadennoù souezhus."

Degemer enta yezh ar bobl e-giz m'emañ en ur zispri-zout ar "brezhoneg klasek" a zo koulz ha barn ar yezh d'ar marv. "Brezhoneg ar bobl, sañset? Brezhoneg bev an dra-se? Brezhoneg marv, brezhoneg marv ar soñj ennañ!"

Se a zo lavarout ivez e ranker sevel oberennoù diwar-benn relijion ha prederouriezh evit ar gefredourion gristen, pe ar gefredourion vrezhon dre vras, a-raok soñjal en avialañ ar bobl, zoken. Rak preder a c'houlenn evelkent komprenidigezh ar feiz, ha ne c'heller ket tizhout an donder anezhi hep emsoñj devriek.

Padal, en desped da se, e hañval Maodez Glanndour chom disfizius e-keñver Skol SADED, dre ma krou ur yezh nevez, n'eo ket hepken diwar elfennoù dianav d'ar vrezhonegerion voutin, hogen ivez dre ma c'hellfe ar gerioù nevez goveliet gant ar Skol-se emplegañ gwariadurioù e par ar brederouriezh, en abeg da savlec'hioù ar grouerion c'herioù war an dachenn-se. War ar bajenn 184 e lennomp: "Spontet e vezan gant ar re a vez o

krouiñ gerioù nevez e brezhoneg, hep damwelout netra er pezh a zo da zisplegañ, lakaomp, war dachenn ar brederouriezh pe an deologiezh... Ar wirionez a c'houlenn un enklask a grenan dirazañ..."

E meur a arroudenn arall avat e kav ar skrivagner abeg en implij en dije graet SADED eus gerioù kozh pe dennet eus yezhoù keltiek all evit fardañ ar brezhoneg arnevez; en em c'houlenn a rafen a-walc'h avat, ha n'eo ket bet degaset ar skrivagner da zisfizout diouzh ar brezhoneg-se o klask lenn oberennoù barzhed 'zo o deus en em harpet war labourioù Saded ha Kis-Saded evit aozañ ur seurt jagouilhaj digomprenus, a oa mennet dreist-holl da c'holeiñ gouloder o freder. O soñjal er re-se, marteze, eo ez erbed Maodez Glandour, war ar bajenn 180 "geriaoueg ar brezhoneg kustum" en ur zisteurel ur yezh ha "na vefe nemet kembraeg hag hengeltieg."

E sigur ar "geriadur etrevroadel" e tiskleir Moadez Glandour ez eo arabat "na degemer, na skubañ", Ouzh-pennañ a ra avat: "Ul lodenn vat a zo da dreiñ," emezañ, pezh a ziskouez emañ ar skrivagner a-du gant keltiegezh ar geriadur gouizieki ha skiantel e brezhoneg. War a seblant avat, e karfe Maodez Glandour chom war live ar yezh Walarnek, o terc'hel kont eus elfennoù arnevez ar yezh. Bepred war ar bajenn 180 e resiz "... ha n'eo ket ober eus ar ouiziegezh un dachenn serret d'al lodenn vrasañ eus an dud gant orjalennoù dreinek gerioù digomprenus..." Ha war ar bajenn 178 e skrive: "... Skrivañ mat n'eo ket aridennat gerioù souezhus ha divoutin, na geriadur ar c'hembraeg hag an iwerzhoneg."

Bezeta pe vezet, merzet en deus Maodez Glandour pouez ar yezh evit dizoleiñ ha perc'hennañ ar wirionez, peogwir e tispleg war ar bajenn 178 adarre: "Ar pezh a ra an den eo e c'halloud da envel an traoù, a laka anezhañ da vezañ mestr warno; seul vui ma resiza ha ma pinvidika e yezh, seul vui en em astenn hag en em starta e vestroniezh."

Evezhiadennoù all ar skrivagner e-keñver ar yezh n'int ket ken pouezus. En ul lodenn anezho ne ra Maodez Glandour nemet diorren notadennoù bet graet gantañ

daou-ugent vloaz a-raok, da geñver embannidigezh ar "Bouddha hag ar Vouddhaadegezh", e ser arver an anv-gwan e brezhoneg, da skouer. Talvoudus eo an evezhiadennoù-se, moarvat, met kalvezel-rik e chomont, a-benn ar fin. Ar pezh a zleer dastum hepken eus kement hon eus displeget a-ziagent eo emañ ar skrivagner a-du gant ur yezh ouizieki diorreet, n'emet e hañval a-hend-all disteurel an hent dibabet gant SADED-Kis-SADED da dizhout ar pal-se, hep m'en dije klasket a-zevri, a gav din, studiañ dre ar munud an arnod bet kaset da benn gant ar re a oa e penn an embregadenn-se; moarvat n'en deus ket bet tro nag amzer d'henn ober. Marteze e vije bet arsteriekoc'h e varnadenn m'en dije kavet an tu da ren hevelep enklask en un doare pervezh ha gant reizh.

\*\*\* \*\*

#### Danvez an oberenn ha kudenn an arz

Poent e vefe komz eus danvez an oberenn hec'h-unan, ar pep pouezusañ a zo enni, eveljust. Ken pinvidik eo an oberenn avat, adarre, maz eo tenn reiñ ur rentañ-kont bastus ha leun anezhi. D'ar c'hentañ sell e hañval an dremmwel anezhi bezañ ledan-kenañ, evel ma ro da soñjal talbennoù ar c'hevrennoù anezhi: "Ster hon emgann", "Kultur ha sevenadurezh", "An Arz", "Ar Varzhoniezh", "Ar Yezh", "Ar Spered hag an Emreizh", "An Istor hag an Hengoun", hogen evit gwir n'eus argerzh ebet er steuñv-mañ, ha darn eus an evezhiadennoù a zo bet skridaozet ha kinniget gant ar skrivagner dindan an talbenn-mañ-talbenn a c'hellje bezañ bet renket dindan un talbenn all, a soñj din, meur a wech.

Deurus e vije bet addisplegañ dre ar munud mennozioù ha tezennoù pennañ Maodez Glandour a-zivout an testennoù-se. Ne gredan ket koulskoude e talv ar boan daleañ kalz o komz diwar o fenn. Seulabred en deus bet tro ar skrivagner, da skouer, da verat ar c'hudennoù

a denn d'ar varzhoniezh ha d'an arz, e-barzh pennadoù bet embannet gantañ e-barzh "Studi hag Ober", "Kaieroù Kristen" pe "Al Liamm" zoken meur a zek vloaz a-raok, ha moarvat ivez hon eus bet an tu d'ober un addispleg dezho er studiadenn hon eus savet diwar-benn oberenn ar barzh-mañ e deroù ar bloavezhioù '50. Notomp koulskoude ar grennvarn douget gantañ a-zivout an arz, war ar bajenn 98 : "An arz a zo kenstag ouzh ar brederouriezh..." Ret eo enta d'an arzour kaout un dra bennak da lavarout. Lenn a reomp war ar pajennoù 100-101 : "Ar pezh a zo abeg d'an arz bezañ didalvoudek eo n'o deus an arzourion netra da lavarout..." Ha pelloc'h war an hevelep pajenn e tiskleir Maodez Glanddour : "Bep gwech ma c'hoarvez d'ur sevenadurezh, evel m'emañ kont bremañ, koll ar skiant eus ar verzaadurezh voundonielse eus ar bed, en em goll an arz e tezennoù kleuz... e kanmeulidigezh ar sexus, plexus, nexus..." Ha war ar bajenn 102, e sigur ar c'hoariva gall : "Esmaeoù, ha pa vefent esmaeoù tud veur, a chom bepred esmaeoù..."

E soñj Maodez Glanddour ez eo stag an arz ouzh natur doueek an den e-unan krouet gant Doue diwar ar skeudenn anezhañ. Lennomp ar bajenn 130 : "Arz kristen : enkorfañ an doueel... Hevelep kudennoù ha gant enkorfidigezh ar Verb hec'h-unan..." Ha war ar bajenn 132, pelloc'h : "Un dra ne dalv evit Doue nemet hiniennel e vefe : n'eus nemet an hiniennel a vefe kevrin distrad..."

Pouezus eo enta evezhiañ e kred Maodez Glanddour ez eus un arz kristen, diforc'h diouzh kement arz all a zo, ha dreist-holl, na petra, diouzh an 'arz rik' pe an 'arz evit an arz', evel ma kred ivez ez eus ur sevenadurezh kristen, rak pelloc'h, war an hevelep pajenn ez ouzhpenn : "Ar sevenadurezh kristen a c'houlenn oberennoù personel, hiniennel, dibar..."

En em c'houlenn a c'hellfed ha n'en dije ket ranket Maodez Glanddour, a-benn ar fin, disteurel ul lodenn vras eus al lennegezh vrezhonek arnevez, dre m'he deus houmañ degemeret diazezoù ar sevenadurezh arnevez dizoue. Daoust ha kalz pezhioù-barzhoniezh nevez embannet en hor yezh ne sentont ket ouzh gizioù lennegel ar yezhoù meur, sañset meur, ha "na ziskouezont dindan

an anv a lennegezh nemet c'hoarioù didalvez..." (p.128). Ha war ar bajenn 138 e tamall Maodez Glanddour d'ar varzhed vrezhonek arnevez kenstrolañ "gerioù diaes, rouez, iskis... hep kontañ ar re a grouont, brokus..." A-benn ar fin 'ta, e brezhoneg hag en emsav e-unan e c'hell an emsaver hag an arzour kristen en em gavout en ur vro estren !

#### Doare ar vrogarouriezh vrezhon hervez Maodez Glanddour

Ur broadelour 'klasek' ez eus a Vaodez Glanddour. Nac'hañ a ra, da skouer, bezañ skritellet a-zehou pe a-gleiz. "Chouant ha Boned Ruz ez on war un dro," a skriv, hardizh, un tu bennak en e levr. Ha war ar bajenn 243, e skrivo adarre : "Ha me armorikad diwezhañ, soñj am eus... va zadoù-kozh krouget gant soudarded ar roue gall, va c'hoarezed gwallet gant an alouberion, ar vugale divouzellet gant armeoù an Dispac'h gall..." Hogen arroudennoù all a c'hellfed restañ hag a ziskouezfe e fell dezhañ, da gentañ, bezañ ur broadelour, a-us d'an holl gostezeñnoù gall. War ar bajenn 77 e lennot, da skouer : "Ur mirour eo ar Breton ? N'on ket sur ! Un hengounour ? Ya, a-walc'h, met kerkoulz all un araokaour... Hiniennelour, anarkour, a lavaro tud 'zo..." Dre se ez eo douget da reiñ pouez en Istor Breizh da gement hini a vo manet betek ar penn ur brogarour dibleg ha gwirion oc'h herzel ouzh ar C'hallaoued, pe gristen pe zigristen e ve a-hend-all. Ret eo lavarout e klot ar seurt brogarouriezh gant hini Gallaoued kristen an tu dehoù dre vras. "Ne zistaolan," emezañ, "nemet ar re a zo aet d'ober chiboud gant ar Gall evit gonit arc'hant pe enorioù : lastez..." Ur seurt emzalc'h a zlefe degas ar skrivagner da zidamall brogarourion evel Marchal, a oa anezhañ un den enebet a-grenn ouzh ar feiz kristen, nemet a voe unan a ziazezerion "Vreiz Atao". Eveljust e c'hell seurt savlec'h bezañ difennet, met anzav a ranker e c'hell ivez bezañ arvarus evit dazont ar feiz kristen e n'eus forzh peseurt bro e ve, adal maz a en-dro enni ur stourm e sell d'ar galloud, evel ma

c'hoarvez er Stadoù arnevez ; brogarourion dispar a oa, 'keta, eus paotred an Dispac'h gall.

Ret eo anzav a-hend-all ez eo broudet preder ar skrivagner war graf ar vrogarouriezh gant ar plegennoù m'en deus en em gavet enno e-kerzh e redad a vroadelour brezhon, hag ar stourmadennoù en deus ranket kas da benn a-enep d'ar gostezenn rannvroelour en emsav. Kemeromp, da skouer, an diskred a laka, n'eo ket hepken war geltiegezh Vro-C'hall - a zo anat a-walc'h, - hogen ivez war hini Galia gozh. War ar bajenn 236 e lavar : "Galia ne oa ket unvan..." Da lavarout eo, n'eo ket sur e oa Kelted eus an holl C'halianed, ha moarvat, e oa amparet ar ranndir-se gant pobloù keltiek disheñvel, deuet d'en em staliañ war diriegezh ar C'hwec'hkogn da varevezhioù diforc'h en istor an henamzer. N'eus ket bet enta muioc'h a vroad c'halian (pezh a zo sklaer a-walc'h ivez), eget ned eus a vroad c'hall orinel. Hogen an distaoladur-se eus keal ur Vro-C'hall pe ur C'halia geltiek a zo dleet, da gentañ, d'ar youl da enebiñ ouzh tezennoù 'galianelour-gall' F. Falc'hun a venne ober eus ar Vrezhoned 'Galianed-Gallaoued', evel C'hwec'hkogniz all dre vras. War ar bajenn 59 e tispleg Maodez Glanndour adarre n'eus netra keltiek ken e Bro-C'hall ; ha setu an diskleriadur pennañ : re stag eo ar C'hallaoued ouzh ar galleg diwar vremañ. Gwir eo, forzh penaos : ne oufe ar 'C'hallaoued' dont da vezañ Kelted en-dro hep paouez, da gentañ, a vezañ Gallaoued !

E meur a stumm all ez eo 'klasek' broadelouriezh Maodez Glanndour, peurgent dre an dave d'ar broioù keltiek all, petra bennak ma n'eo ket bet gouest ar brogarour-mañ, a gav din, da zeskiñ yezh keltiek tramor ebet, ha n'en deus ket bet a-hed e vuhez darempredoù brientek gant ar Gelted tramor, evel m'o deus bet Armañs ar C'halvez ha Klerg e-unan, a oa kembraegourion ampart o-daou. Hogen, da skouer, techet eo Maodez Glanndour, evel Y.B. Kalloc'h e-unan, dre maz eo kristen ha katolik, da welout en Iwerzhon ar vro-c'hoar dreist d'ar re all da Vreizh. E-touez Iwerzhoniz, evel e-touez ar Vrezhoned, emezañ, e kaver an hevelep doug d'ar varzhoniezh

ha d'ar mousfent. Pouez a ro Maodez Glanndour 'ta d'ur meni 'farserezh 'keltiek'. War ar bajenn 80 e skriv : "N'eus netra yac'husoc'h eget ar farserezh." Hag adarre, e-touez Iwerzhoniz 'ta, e priz adarre, war ar bajenn 76 : "An doug d'ar varzhoniezh... goaperezh didruez ouzh an dud. Kement-se a glot kerkoulz all gant hon doareoù."

Diouzh un tu all e klasko Maodez Glanndour er "werin", - ha kement-se a glot ivez gant e vroadelouriezh 'klasek', hini Roparz Hemon, - un diazez d'e vrogarouriezh. Poblel eo hor sevenadur, distadel, ha disheñvel enta diouzh hini 'kêrel' ha 'riezel' ar C'hallaoued. Diwar ar savlec'h-se e kavo da Vaodez Glanndour ez omp kar-nes d'ar Yuzevion o deus dreistvevet a-hed ar c'hantvedoù evel ur bobl distad. War dachenn ar speredelezh enta e vefemp tost dezho. Lavarout a ra war ar bajenn 78 : "Sellout a reomp evel talvoudus-bras ar ouenn a zo hon hini : un tammig evel ar Yuzevion ez omp... ez eus gwashoc'h eget ar Yuzevion ul lod mat eus ar Vretoned."

#### An distro d'ar werin ha d'an Natur

Hogen, zoken e-mesk Afrikiz, en em santo Maodez Glanndour en e vleud ha diskleriañ a ra perak war ar bajenn 61 : "... me n'en em gavan ket divroet e-touez Afrikiz ; hor sevenadur keltiek hengounel... me, ivez, a soñj en anaon, ha pep tra a zo, evidon, buhez, mentadurezh, koroll ha tan..." Ha perak hevelep kerentiezh gant ar pobloù du ? Dre maz int tost d'an natur. Lennomp, p. 65 : "Skol an Natur : Veig Trebern..." Hag e-lec'h-all : "... diwar ar maez, tost d'an natur..."

Notomp a nevez n'eo ket orinel ar mennozioù-se ; boutin int, er c'hontrol, en eil emsav. Roparz Hemon, ivez, a erbede an distro d'ar "bobl" evel d'ar genteliezh dreistel, hag hor c'houviañ a rae da zistreñ da vammennoù gwerinel al lennegezhioù keltiek war glask hon awen. En Iwerzhon ivez e vefe dizoloet an hevelep tech en emsav ; stank-meurbet ez eo eno ivez, el lennegezh

ouezelek arnevez, an emgounadurioù skridaozet gant gwerinourion a bep seurt o kontañ o buhez 'kentidik' e-kreiz an natur ("An Enezad", "Ugent vloaz o kreskiñ" h.a.), pel' diouzh ar gevredigezh kêrel arnevez ; ar "werin" a zle pourchas ar patromoù stuzegezhel hon eus ezhomm anezho. Adarre 'ta, n'eus ket da souezhiñ ma tizolo Maodez Glanndour ez eo Yuzevion hag Afrikiz nes deomp, dre maz int manet betek hiziv er-maez a grog ar sevenadur bourc'hiz arnevez.

Mat e vefe, marteze, arsteriekaat ster an distro-se d'ar gwrizenioù poblek.

#### An enebiezh ouzh Bro-C'hall

Bez' ez eo an distro-se ivez, evit Maodez Glanndour, un digarez da geferata Breizh ouzh Bro-C'hall, ha da zisplegañ e zisfiz hag e enebiezh outi. Ne gav an arnodskridour netra talvoudus e sevenadur ar vro-se, a zo distaolet a-grenn gantañ : ne gav mat netra nag e "Kastell Versailles", eveljust, na zoken, pezh a vefe souezhusoc'h, en hec'h ilizioù-meur, a zo tamallet dezho bezañ ramzel ha dizenel, ha dizoueel war un dro. Setu, da skouer, barnadenn ar barzh diwar-benn iliz-veur sakr ar C'hallaoued, iliz-veur Amiens enta, pajenn 121 : "Ar wech kentañ m'am eus gwelet iliz-veur Amiens on bet souezhet gant ar santadur a dolzenn a gouezhe hag a boueze warnon..." Ha pelloc'h : "... un ec'honder ha na oa ket diouzh va ment." Ha war ar bajenn 122 e kaver ur varnadenn ken kriz all : "N'hellan ket lavarout kement-all eus Amiens, nag eus Beauvais, nag eus Ilizoù-meur Bro-C'hall, dizenel, roñflek..." Ha Maodez Glanndour ha lakaat ar savadurioù-se keñver-ha-keñver gant kastell Keryann pe gastell Josilin e Breizh, hag a vir dreventoù denel. Notomp amañ e c'hellomp kompren barnadenn ar skrivagner, met kavout a ra deomp ez eo awenet dreist-holl gant e c'heleniezh ouzh Bro-C'hall : an hevelep rebech a ramzelezh a c'hellfe bezañ graet ouzh ilizoù-meur traonienn ar Roen, hag ivez, da nouspet iliz all en Alamagn, pe zoken da ilizoù 'zo e Roma end-eeun, da iliz Sant-Per hec'h-unan, lakaomp. Dre m'en deus

kas ouzh Bro-C'hall ne gav Maodez Glanndour netra mat e Bro-C'hall, nag e "Dezveg Napoleon", nag e netra. Pismigat a ra ar skrivagner, eveljust ivez, "mandarinelezh" ar C'hallaoued, o basted-spered, o 'diwarc'horreegezh'. War ar bajenn 68 e skriv : "Klask a reont [an Alamaned] an didermen e-lec'h n'emañ ket ; ar C'hallaoued avat ne glaskont anezhañ tamm ebet..." Ur varnadenn diazgalv, evel ma weler. Ur skrivagner gall katolik evel P. Claudel e-unan ne gavo ket trugarez dirazañ zoken. Ar bed faltaziet gantañ, eme an aozer, a zo "ur bed serret". Gall-kenañ eo avat "en em serriñ", gouez da Vaodez Glanndour bepred : "... en em serriñ eo ar pec'hed speredel", ha kement-se a c'hoarvez, emezañ pelloc'h, p.68, dre ma kemer ar C'hallaoued "an den evit muzul pep tra : arabat eo sellout en tu all d'an den." Tamallet e vo ivez d'ur Max Jacob, barzh galleg bet o vevañ e Kemper, bezañ gall ivez, a-benn ar fin, evitañ da vezañ ur yuzev kristen a-hend-all.

Tu a vefe da hiraat an displeg-mañ ha lakaat muioc'h e gwel c'hoazh an tuadur enep-gall a zo e diazez kalz barnadennoù distaget gant ar skrivagner. A-viskoazh en deus bet ar skrivagner kas ouzh ar Skol-veur c'hall (kv.lod gwerzennoù eus "Imram") : houmañ, gouez d'ar skrivagner bepred, ne ra forzh ebet eus ar wirionez, daoust dezhi fogasiñ gant hec'h onestiz veizel a-hend-all, evel m'henn diskouez hec'h emzalc'h e-keñver "Barzhaz Breizh" meneget gant Maodez Glanndour e ser afer tezeñ Donasian Laurent a-zivout an oberenn-se. E berr gomzoù, awenet eo ar Skol-veur c'hall ha Bro-C'hall penn-da-benn a-benn ar fin, gant an Droukspered, Tad ar gevier. War ar bajenn 221 e ra Maodez Glanndour ar goulenn-mañ : "Daoust ha gall e vefe an diaoul ? Muioc'h gaouiat eget ar C'hallaoued n'eus ket !"

#### Burutelladur tezennoù Maodez Glanndour

En em c'houlenn a c'heller avat ha ne sko ket argadennoù Maodez Glanndour a-enep d'ar c'hultur gall, argadennoù renet gantañ evel broadelour brezhon, un tamm bennak e-biou d'ar pal. E gwirionez n'eo ket ar c'hultur



gall hag ar patromoù stuzegezhel gall eo a zo da dagañ hepken, dre maz int gall, hogen dre maz amparont ur sevenadur kêrel stadelour diazezet war azeulerezh ar galloud politikel evitañ e-unan. Moarvat, e krouidigezh ar sevenadur-se o deus ar C'hallaoued kemeret ur perzh bras, ur perzh krennus, lakaomp, met n'int ket bet kiriek o-unan-penn da emled ar gwallsevenadur-se en Europa; Spagniz ha Saozon a zo bet ken kiriek hag int e diorreadur ar Stadoù arnevez, ha ken gwazh all, an Alamaned, an Italianed hag an Amerikaned war o lerc'h; se hon eus merket meur a wech. Hag ouzhpennañ a c'hellfed n'o deus graet Europiz, neuze, dre vras, nemet adpiaoañ patromoù sevenadurel hollveziadel, bet ledet penn-da-benn d'ar voull-douar en egor hag en amzer, a-c'houde maz eus bet diazezet kevredigezhioù politikel kêrel dre ar bed: Japan, Roma, Sina, Turkia h.a. Ret eo darbenn enta n'en deus ket esaeet ar skrivagner hollekaet ar gudenn. Goude holl, ne rae an eil emsav nemet drevezañ an emsavioù o doa savet ar riezvroadoù europat, ha klask sevel e Breizh ur Stad par d'ar Stadoù europat all, ha na vije ket bet, moarvat, gwall zisheñvel diouto. Diouzh un tu all, en dije gallet Maodez Glanndour meizañ ne glot nep stuzegezh poblek, dre ret, gant ar feiz kristen. Gwaskus ha moustrus e c'hell bezañ stuzegezhioù gwerinel 'zo, evel darn eus ar re a c'helled kejout ganto war zouar Afrika, a-raok donedigezh Europiz zoken. Hogen, evel m'hon eus bet tro da evezhiañ a-ziagent, bez' e felle da Vaodez Glanndour menel e par stourm an eil emsav, e rez, enta, an tabuterezh hag an arvellouriezh enepgall pleustret gant an emsav-se adal an deroù.

#### Taerded ar brogarour

Anzavomp a-hend-all e oa taer ha brezelgar brogarouriezh Maodez Glanndour. Etre an emsaverezh hag an emsujerezh klok d'ar galloud gall, gouez dezhañ, n'eus ket a lec'h etre. "Ober chiboud, pe dantañ: that is the question." Ul lavarenn hag a glot a-walc'h gant gwerzenn Goethe: "Hammer oder Ambosz sein..." (P.246). Hogen ken izel ez eo kouezhet hor pobl ma ne chom mui nemet

ar feulster evit saveteiñ hec'h enor, war un dro gant he buhez. Afer hon eus, eme ar skrivagner, war ar bajenn 246 bepred, ouzh "ur bobl a druanted oc'h astenn o dorn, ur bobl a vevelion o lipat an dorn en deus skoet ganto. Ne damallan ket anezho: tud diberc'hennet int." En un arroudenn bennak all ez implijo Maodez Glanndour zoken ar c'herienn "**arallekaet**", p. 52. "N'eus ket da c'hortoz digant tud arallekaet o divije emskiant eus ar pezh a zlefent bezañ." Douget e vefe ar skrivagner enta d'ur seurt beliellouriezh emsavel evit adober eus Breizhiz gwir Vrezhonad adperc'hennet o yezh ganto. Diarc'hañ a ra enta evit an emsav ar gwir da rediañ an dud e Breizh da zeskiñ brezhoneg. "Rak," eme Vaodez Glanndour, "paz eus tud o vont d'en em lazhañ e klasker herzel outo hep goulenn o ali." Moarvat ez eo kreñv ha pelldizh an holl ziogeladurioù-se, hag e vez, ouzhpenn, reizhabeged ganto nep feulster a c'hellfe degas ar pare d'ar glañvourez ez eo Breizh, pe ar frankiz d'ar vroad a zo dalc'het e kazel-gê. Prest eo ar skrivagner da grediñ ivez o deus ar vrogarourion ar gwir da gas o emgann betek ar penn. Ne vev ur vroadelezh, emezañ, nemet "e kement ha ma c'houzañver ha ma varver eviti"

Hogen, daoust ha souezhus eo ar feulster-se, a zo, da gentañ, a gav din, ur feulster speredel, pa verzer pegen kizidik e oa ar skrivagner ouzh stuz izel ha disme-gañsus e bobl penn-da-benn. E meur a lec'h, hogen dreist-holl war ar bajenn 56 e komz Maodez Glanndour eus "ar vezh kantvedel taolet war hor pobl..." Ha dres a-raok e tisklerie: "N'helli ket ur bobl a druanted dihuniñ anezhi hec'h-unan." Se a zo lavarout e ranko bezañ dihonet gant ar stourmerion, pe c'hoazh, ez eo an emsav keflusker nemetañ ur Bobl Vrezhon ha na c'hello biken adkavout e emskiant er-maez anezhañ. En degouezh-mañ avat, gwelout a reer, en em zoug ar skrivagner evel ma rafe n'eus forzh peseurt stourmer politikel broadelour o vennout ober eus e bobl ur gumuniezh politikel riezal arnevez. Ne lavaromp ket ez eo fall eveljust, met daoust ha ne zleje ket ur c'hristen bezañ bet gouest war un dro da zougen ur varnadenn war natur ar riezvroadelourie-

ezh arnevez diwanet abaoe deroù ar grez arnevez en Europa, ur patrom a venne hag a venn an emsav seveniñ en hor bro ?

#### An dieubidigezh speredel da gentañ

An holl notadennoù-mañ a c'houlennfe, e gwirionez, bezañ sklaeraet ha resizet. Daoust d'an holl arroudennoù bet nevez restet ganin en dilinennad kent, ne gav ket din e oa Maodez Glanndour den ar "politikerezh da gentañ"; ne oa ket ar Stad evitañ an uhelgal dreistel. Al lec'h kentañ a ro d'an "emrenerzh kulturel ha speredel". Ar pep mallusañ, en e soñj, a zo kempenn ur "frammadur kulturel". "Gwalarn" ivez, war e veno, a zo pouezusoc'h eget "Breiz Atao". Ha war ar bajenn 235 e lavar: "Ned eo talvoudus ar reizhadurioù politikel nemet en em zisklerfent e reizhadurioù kulturel gwirion."

Moarvat, evel m'hon eus bet tro da verkañ, e chom Maodez Glanndour ur stourmer eus an eil emsav deuet d'an emgann evit Breizh dre luskad "Gwalarn" ha levr brudet Roparz Hemon "Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh". Netra souezhus enta ma kaver dindan e bluenn troiennoù a zegas da soñj troiennoù all implijet gant rener "Gwalarn". Da skouer, p.67: "Trugarekaat an Aotrou a zo d'ober o vezañ m'omp bet kavet dellezek da c'houzañv evit ar Spered..." Ar c'homzoù-mañ, moarvat, a c'houlennfe ur plañadur bennak. Ar ger "Spered" eo a zo heverk amañ, rak diskouez a ra e rank ar stourmer kristen a gemer perzh en un emsav laïk laïkaat ivez e breder hag e c'heriadur. Pezh a c'hell degas anezhañ a-wechoù da arverañ bommoù-lavar a seblanto bezañ stambouc'het ha goullo un disterañ e goulloù ar feiz, evel ar re a vez implijet, dre vras, da zisplegañ an divezelezh laïk. War ar bajenn 26, da skouer, e skriv Maodez Glanndour adarre: "Gant an emrenerzh brezhon, ar pezh a zo en afer eo ster uhelvoudel buhez an den." Un nevezoc'her ez eo amañ "uhelvoudel", ha kavout a ra din ned eo bet implijet nemet gantañ el lec'h-mañ. Bezet pe vezet, a-benn kompren al lavarenn e ranker derc'hel koun e tiskleir Roparz Hemon tost da vat kement-all e-barzh

e levr "Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh". Unan eus dodennoù an oberenn-se eo ez eo an emsaverezh brezhon un tu da dizhout ur seurt dieubidigezh kefredel ha meizel (ur mennoz a zo reizh a-walc'h, forzh penaos). O vezañ maz eo Bro-C'hall digristen, da soñj ar skrivagner, servijerez an Droukspered, e c'hell an dieubidigezh kefredel kinniget gant an emsav degas ur gounid asur d'ur meizour kristen; se a zo sur. Hogen daoust hag an emsav devoudel, evel m'en deus emdroet goude ar brezel diwezhañ, levezonet ha renet gant meizourion ha renerion digristen, en dije adsavet e Breizh ur vroad gwall zisheñvel diouzh an hini c'hall istorel argarzhel kement gant Maodez Glanndour, lakaet en dije gelllet ober berzh? Sed an aters a zleomp ober adarre. N'eo ket kredapl nemeur e gwirionez; sed an eilger a ranker ober. Neuze, n'eo ket e par an emsav-se, ma kemere-eñ perzh ennañ, e c'hellje Maodez Glanndour bezañ tizhet an uhelgal a lakae d'ar stourm breizhek.

M'en dije ar skrivagner enta merzet an dirvoud-se, daoust ha gelllet en dije uhelsevel an emaberzh klok e sell da dizhout pal un emsav ha na vije ket bet mui kristen? Menegomp adarre ar pezh a skriv Maodez Glanndour war ar bajenn 67: "Ne vev ur vroadelezh nemet e kement hag ez eus tud o stourm hag o vervel eviti." A zo gwir, met mat eo merkañ ne vank ket en hor bed an emsavioù, direizh a-grenn a-wechoù, a c'houlenn hevelep emaberzh klok a-berzh o izili. Moarvat n'en doa ket santet ar stourmer kristen-mañ e-pad pell amzer ar bed hag an emsav o kemm, betek dont da vezañ ar c'hontrol-bev eus pezh e oant e tarzh e yaouankiz.

#### Emzalc'h ar skrivagner dirak diskar ar sevenadurezh europat

Moarvat e vo souezhet unan pa lavarin ne grede ket Maodez Glanndour en ur sevenadurezh vrezhon, hag eñ emrener ha broadelour a-hend-all. E devoud e skriv war ar bajenn 51: "N'heller ket komz eus sevenadurezh breizhat." Moarvat e ro Maodez Glanndour d'ar ger-se

ar ster a zo d'ar ger kembraek "gwareiddiad", da lavarout eo, doare-bevañ danvezel, hag e devoud ez eo holl Europiz perzhiek hiziv en hevelep sevenadurezh. Komz a ra ar skrivagner avat eus "kultur breizhat" ha "kultur europat". Ha termeniñ a ra e vezad eus ar c'hultur bepred war ar bajenn 51, pa skriv : "Emañ ar c'hultur o kemm pa gemm an talvoudoù a zo an diazez anezhañ, pe c'hoazh, pa gemm ar renkadur etrezo..." Met pelloc'h ez implij ar ger "sevenadurezh" en ur reiñ dezhañ ar wech-mañ talvoudegezh ar ger "kultur" : "Emañ ar sevenadurezh europat o'n em zispenn en un emlazh souezhus..."

Ha peseurt galloud, peseurt reizhiad a zo kiriek d'an emzistruj-se a zo anat e Breizh dreist-holl ? Hama, adarre an hini gall difennet gantañ tezennoù un denelouriezh diskiant. Setu gerioù Maodez Glandour war ar bajenn 52 : "Un denelouriezh nevez ?" [Damveneg amañ eus soñjoù Maritain, ar prederour gall kristen, emichañs] "N'eo ket denelouriezh a zo da glask, met un denelouriezh wirion !"

Ha pelloc'h ez ouzhpenn ar skrivagner, war ar bajenn 53 : "Breizh [a zo] kouezhet er varbariezh diwar ar skol c'hallek..." Ha pelloc'h adarre e pouez Maodez Glandour war giriegezh ar reizhiad-skoliañ gall da ziskar speredel hor bro. Setu un arroudenn teskaouet war ar bajenn 55 : "Desket e vezomp holl gant ar skol c'hall, ha gwashoc'h c'hoazh, gant ar Skol-veur c'hall..." Forzh penaos, e chom diwar-c'horre kement a c'hell bezañ degaset deomp gant ar reizhiad-skoliañ gall. Setu un evezhiadenn war ar bajenn 56 : "Ur vuhez-den a zo nebeut a dra evit un den d'en em stummañ..."

Moarvat o deus gallet Breizhiz, en abeg d'an Hengoun o doa miret, en em ziwall diouzh kontammadurezh ar sevenadurezh gall hag europat arnevez. Met betek peget e c'hellint en em zifenn ? Setu ar gouenn a ra ar skrivagner dezhañ e-unan war ar bajenn 63 : "Hag-eñ e c'hello ar broioù bihan en em salviñ a-raok bezañ kontammet dibare ?" War a seblant enta, e kred Maodez Glandour o deus dalc'het ar pobloù gwerinek, ar c'henelioù, evel Pobl Vreizh, diwar an Hengoun miret ganto, ur seurt furnez poblek o klotañ gant an Diskuliadur kristen ;

alese ar pouez a ro ar skrivagner d'ar stuzegezhioù poblek evel ar re afrikat ; eus se hon eus komzet uhelloc'h. Lenn a reomp war ar bajenn 65 : "... evel kement tra vev, e chom an hengoun hep gallout bezañ dielfennet da vat, na meizet peursklaer... Pelec'h kavout an hengoun-

Respont a ra neuze Maodez Glandour : "Emañ en un doare dreistpenn el lennegezh... en abeg d'ar skrivagnerion bezañ bet emskiantek-kenañ..."

Eus peseurt skrivagnerion ez eus anv avat ? Dic'hortoz a-walc'h eo dibenn an arroudenn, rak goulakaat a rafe e chomfe ur bobl feal d'hec'h hengoun bepred. Moarvat o deus skrivagnerion "Walarn", ha Roparz Hemon peurgetket, prizet an hengoun poblek, ha kement a oa relijiel ennañ, hogen daoust hag an dra-se a c'hellfe bezañ lavaret a-zivout al lennegezh vrezhonek a zo dinodet adal ar bloavezhioù '60, lakaet e vije bet awenet gant ur speredelezh bennak ar skrivagnerion o deus en em ziskouezet diwar neuze ?

Hogen, adarre, an "natur" hec'h-unan eo a glask Maodez Glandour en hengoun, peogwir e lavar diwar he fenn war ar bajenn 75 : "Desket em eus diganti muioc'h a dra eget digant ar paper-moul." Disfiz en deus ar skrivagner ouzh pezh a zo anvet gantañ war ar bajenn 75 bepred : "Difetisadurioù ar ouiziegezh levraouel" hag a laka tud an amzer-mañ "da vevañ en un doare huñvre meur, en diavaez eus ar gwirvoud...", evel ma skriv war ar bajenn 80, hag a zo hepken "deskamant", diforc'h a-grenn diouzh ar "c'hultur" gwirion. Sed pezh o deus ar veleion a hiziv, eme ar skrivagner, war ar bajenn 82 : "deskamant hep kultur !"

E soñj Maodez Glandour enta, ne c'hell ket al lennegezh bezañ aner pe c'hradus, bezañ ur c'hoari-gerioù. Pezh ez eo deuet da vezañ en hon amzer en holl vroioù. Bez' e tle dameuc'hañ "natur" diabarzh ar skrivagner, an arzour, un "natur" hag a zo hec'h-unan ar skeudenn eus "natur Doue", "Rak-se." emezañ war ar bajenn 96. "un dra doueel eo ar gened, un tañva eus gwelidigezh peurbadel Dóúe."

Bez' e tle enta an "natur" en em ziskouez en oberenn a arz pe a lennegezh klotañ gant an hini a zo bet krouet

Doue, gant skiant ar Boud, gant ar Voudoniezh, pezh na c'hoarvez nepred en hon amzer "kollet [ganti] pe dost pep gwelidigezh eus ar voudoniezh"ha pleustret ganto, divorc'hed, un "naturelouriezh" denel dizoue, hini an naontekvet kantved, a ziskleir Maodez Glanndour deomp war ar bajenn 98; an "naturelouriezh"-se a sell ouzh an den evel ouzh disoc'h un dargouezh, barnet d'an netra, barnet da "darzhañ trumm", evel ar "glogorrenn" deskrevet gant Roparz Hemon e-barzh "Pirc'hirin ar Mor", un "naturelouriezh" netraelour erziwezh, evel maz eo oberenoù al livour Picasso e-unan, a verk ar skrivagner war ar bajenn 99.

Danvez an arz, eme c'hoazh Maodez Glanndour, n'eo ket plijout o hilligañ skiantoù an den, met bezañ feal d'an natur krouet gant Doue. Da skeudennañ e vennoz e ra ar skrivagner dave d'ar c'han gregorian: "Evel ar sonerezh breizhek, n'eo na plijadurus, na mekanikel, met ur sonerezh eneel... [da] lakaat ar selaouer da vont e-barzh." Ha Maodez Glanndour da glozañ war ar bajenn 128: "Dre ma tizanevez ar sevenadur-mañ ar Boud, emañ o rampañ d'an argoll."

Bez' e tle an arz, adarre, "adframmañ" an den en "holladegezh fetis an natur", eme an aozer war ar bajenn 145, "e linkusted an amzer," "e padelezh ar bezoud". Ned a ket ar barzh maz eo Maodez Glanndour betek lavarout, evel Bokachio, ez eo ar varzhoniezh "teologiezh", na zoken "boudoniezh", rak estreget mennozioù a zo er varzhoniezh, emezañ; da nebeutañ avat e tle d'erc'hel kont anezho.

#### "Ar Spered hag an Emreizh"

Er pajennoù kent hon eus gwelet penaos en deus bet tro ar skrivagner da vurutellañ ar sevenadur arnevez bet diorreet e ser emled ar Stadoù 'bourc'hiz', abaoe dibenn ar grennamzer, hogen er pennad a zo talbennet gantañ "Ar Spered hag an Emreizh"eo en deus douget a-enep dezhañ ur varnedigezh groñs ha diazgalv, hag eñ o tamall dezhañ dreist-holl bezañ awenet gant ur skiantelouriezh diwar-c'horre ha genaouek.

War ar bajenn 187, da skouer, e skriv: "Petra eo ar spered skiantour? Un doare sellout ouzh ar boudoù evel fenomenoù, evel c'hoarvoudenoù, hep mont da glask an abegoù gwirion ha don." Hag ouzhpennañ a ra ar skrivagner, war ar bajenn 188, "e tro ar skiantourion da grediñ n'eus gant ar gwirvoud nemet diavaezioù..." Ar gwashañ avat eo ez eo bet intret ar yaouankioù gant ar wallsperegezh-se. War ar bajenn 188 bepred e lenner adarre: "Er yaouankizoù a-vremañ, reolenn ebet ken, netra eus ar pezh a anvemp gwechall ar goustiañs; en em roet int d'an diavaezioù..." An dibenn eus kement-se, a zastum ar skrivagner, ez eo an emlath speredel m'he deus hor c'hevredigezh kempred en em roet dezhañ."

Hogen penaos souezhiñ e ve dihentet ar yaouankizoù pa n'eus den ebet d'o bleniañ e-mesk ar re a zlefe o ambroug, ha peurgent, e-touez ar veleion o-unan, dizesk pe vrizh-desket peurvuiañ, a verk Maodez Glanndour war ar bajenn 189: "Zoken ar speredoù a dlefe, dre o doug donañ, bezañ barrek da santout ar bezoud hag en em dreiñ war-du ennañ, a weler berrwel er c'heñver-se, hag ez eus a-wechoù da vezañ mantret gant se, beleion h.a."

Ha kement-se a zo c'hoarvezet, a addispleg ar skrivagner pelloc'h, dre maz eo bet disprizet an natur hag ar bezoud e pep doare, er rez pleustrekañ zoken. Ar mennoz-se eo a zo plaenaet er pajennoù war-lerc'h, e-lec'h ma tifenn ar skrivagner ur seurt "amvevadouriezh" kristen. War ar bajenn 190, e skriv: "An holl gelennerion a ankoua an natur, hag en o zouez, kenkouls all, ar gelennerion labour-douar..." Ha war ar bajenn 191: "Klasket hon eus bezañ mistri war an natur, evel pa ne vefemp ket ul lod anezhi; hec'h adkrouiñ, en ur grediñ ez omp kement ha doueed..." Ha war ar bajenn 192: "Kollet en deus an den ar santerezh eus kaerder an natur... Ne glask muzul naturel ebet ken."

Er pajennoù war-lerc'h e tiskouez ar prederour pebezh gwasterezh a zo degaset er sevenadur m'emaomp beuzet ennañ gant un danvezelouriezh deuet da vezañ kredenn gefridiel ur gevredigezh penn-da-benn. Ha setu heulradoù

ar walenn speredel a zo o tistrujañ ar gevredigezh-se, ha war un dro un lliz hag a zo enframmet re strizh enni, a-benn ar fin, o klask da vat kemer perzh en he buhez. Ar pezh a zegouezh diwar-lerc'h se, eme ar skrivagner war ar bajenn 193, eo n'eus mui "lezenn naturel ebet..." er gevredigezh dinazel; en lliz e ra e reuz "an disakrañ el lidererzh", "ar boutinelaat e buhez hag e karg ar veleion; ar skarzhañ kuit an dreistnaturel war dachenn ar gredenn..." Ha war ar bajenn 194: "Gant an danveze-louriezh, n'eus netra ken o reizhañ an dud eus an diabarzh; mennad uhel ebet ken, nag e-keñver ar bed-mañ, nag e-keñver ar vuhez dreistdouarel! Ha koulskoude e rank ar Stad kaout ur Framm, un emzalc'hadur." En holl bazennoù ar gevredigezh e ren ar brezel hag ar feulster, ur feulster deuet da vezañ ur reizh politikel dindan an talbenn a "stourm etre renkadoù", un droienn n'eus nemet ar ger "stourm" o kaout ur ster enni, rak aet eo da get pellzo ar pezh a oa anvet "renkad" en naontekvet kantved; n'eus mui anv en hon amzer nemet eus kenstokoù etre kendereoù ha rummoù diniver. War un dro ez eo en em skignet ivez an hudurniezh. Lennomp avat pezh a lavar ar skrivagner war an divoud-se, pajenn 194: "Argaderezh hag orgederezh... o-daou nemet un hevelep tech eus ar Galon. Buhez diroll ha brezel a zo kenstag... gwallañ ha tangwallañ."

A-benn ar fin ne zegas an dunfrankizouriezh-se a zo kelennadurezh ha kealiadurezh kefridiel ar Riezoù arnevez d'he heul nemet mac'homerezh ar Galloud hag ar Stad. Skrivañ a ra ar skrivagner war ar bajenn 196: "Urzh didruez ar galloud politikel a zeu da vestroniañ al lec'h lezet goullto gant ar c'houstiañsoù..." Kement-se avat, a addispleg Maodez Glanndour, war ar bajenn 198, ne vije ket c'hoarvezet ma n'he dije ket an lliz dilezet ar mennad da stummañ hervez an Aviel ar gevredigezh politikel, evel maz eo he dlead ober: "...tonkadur personel ha dreistnaturel an den; hag o vezañ n'hall ket an tonkadur-se en em zispakañ er-maez eus ur c'helc'hiadur kevredigezhel o vont eus an tiegezh d'ar Stad e rank an lliz pleañ gant ar politikerezh..."

### Gwariadur ar brederouriezh

War ar mennoz-se e tistroio ar skrivagner meur a wech, hogen en ur pennad all, hini an Istor. Gouestlet eo pajennoù diwezhañ ar pennad-se da vurutelladur ar brederouriezh arnevez a glask reiñ, emezañ war ar bajenn 199, ur reizhabegadur da "emziskar, emzistruj, emlazh" hor c'hevredigezh. Emañ taget en arroudenn-se ar gealiadegezh hegelat, hag an ersezadoù anezhi, e-giz ar varksouriezh. Diwar-benn ar prederouriezhoù-se e lavar Maodez Glanndour war ar bajenn 204: "E-lec'h bezañ ur skeudenn leal eus ar gwirvoud e teu ar menoziad da vezañ ur savadur arouezius difetis; emañ ar reizh o c'hoari ganto e kenstrolladurioù a seblant seul splannoc'h ha sebezusoc'h ma n'en deus ken, a-benn ar fin, darempred ebet gant ar gwirvoud." Sevel a ra ar prederour arnevez "bedoù a vennozioù n'o deus netra da welout gant ar gwirvoud."

Diskuliañ a ra Maodez Glanndour war un dro un nebeut kealiadoù stag ouzh ar brederouriezh arnevez kefridiel o deus diskouezet bezañ noazus ha dañjerus, gouest da bourchas un didamalladur da renadoù mac'hom a bep seurt. Ha Maodez Glanndour da ziskleriañ war ar bajenn 202: "Dispac'h difin... emdroerezh peurbadel... an hevelep sevenadur danvezel a c'hell kas hag a gas evit gwir da stummoù kevredigezhel disheñvel... A-benn ar fin o deus ar c'hevredigezhioù en em roet d'ar follentez..." Ha pelloc'h, war ar bajenn 204: "Ur gevredigezh ha na ren ket enni ur mennoziadur o klotañ gant ar gwirvoud, a zo ur gevredigezh en em roet d'ar follentez..." Rak neuze, emezañ pelloc'h, "dibabet en deus [an den] bezañ ur boud e-unan en diavaez d'ar bed." Kement-se a zo c'hoarvezet "dre maz eo aet ar meizerezh war-du an oberiañ, war-du ar gouzout evit oberiañ, en ur zilezel ar gouzout evit arvestiñ..." Setu pezh a ziskleir Maodez Glanndour war ar bajenn 205. Ha war ar bajenn 206 e lavar ouzhpenn: "...ken ez eo deuet an den da vezañ un Narkis o'n em sellout, o'n em grouiñ..."

Kendaoniñ a ra Maodez Glanndour a-grenn ha penn-da benn ar gevredigezh arnevez, ha dreist-holl ar gevred-



gezh c'hall. Ned eo ar gevredigezh en hor grez, emezañ war ar bajenn 209, nemet "ur produadur eus ijin teknikourion ar Gevredigezh"end-eeun, ur gevredigezh e-lec'h emañ "galloud ar "vandarinelezh" oc'h ober e reuz hag e renkoù e pep lec'h. Ar Skol-veur hec'h-unan ne servij nemet da "stummañ [ar speredoù] diouzh ezhommoù ar Stad." (p.210), ken e ra ar skrivagner ar goulenn-mañ evit echuiñ, war ar bajenn 222 : "Emañ ar gevredigezh o vreinañ an den : pe dreist-holl, ha da gentañ, daoust ha n'emañ ket an den o vreinañ ar gevredigezh ?"

E-kreiz an enkadenn-se ne wel Maodez Glanndour goanag ebet e Breizh, nemet e kresk un emsav en defe da bal kentañ disteurel Bro-C'hall hag he sevenadur danvezelour ; e c'hoanag a lakafe ivez e diwanidigezh un emsav kristen er vro-mañ, un emsav kristen 'ta hag a bourchaso d'un Iliz, breinet amañ evel e-lec'h-all er C'hwech'hkogn gant ar c'hallikaniezh hag ar vodernouriezh, ar frammoù nevez he deus ezhomm anezho el ledenez-mañ. War ar bajenn 221 ez asur Maodez Glanndour : "Ne vo adsavet ar Gristeniezh amañ nemet pa vo adsavet war un dro kement a zo amañ kevredigezh kristen, ha distrujet kement a zo amañ galloudoù a varv." Ha war ar bajenn a-raok e c'hellemp lenn : "A-benn nebeut e ranko an dud amañ dibab en-dro pe Breizh pe ar marv..." Moarvat, Hogen daoust ha n'eo ket neuze, dlead kentañ an emsaverion gristen e Breizh, an nebeudig anezho a zo o treistvevañ, adsevel, da gentañ, ur Vreizh kristen broadel ha n'eus ket mui anezhi ?

#### Gwelidigezh an Istor gant Maodez Glanndour

Ul lodenn vat eus oberenn diwezhañ Maodez Glanndour a zo gouestlet da gudennoù an istor hag ar politikerezh. Klasket en deus ar skrivagner herzel ouzh techoù-soñjal kleizelour izili an trede emsav, a felle dezho diren kudenn Vreizh d'ur gudenn armerzhel. Moarvat e oa e soñj, er penn-kentañ, tamall dreist-holl paotred ar CELIB e-unan. Ar re-se eo a zo diskuliet nouspet gwech el levr-mañ, war ar bajenn 60, da skouer : "Tud a-walc'h

a zo en emsav a fell dezho plediñ da gentañ ha dreist-holl gant kudennoù an armerzh." Ha war ar pajennoù 228-229 e rebech Maodez Glanndour ouzh an istorourion "bezañ techet da reiñ d'an darvoudoù un abegadur unpezh arboel-lerrezhel..." Ha c'hoazh pelloc'h war ar bajenn 245 : "Ne gredan ket e levezon redius an armerzh war ar c'hudennoù yezh..."

Emdouell an 'armerzhelouriezh' a zo, e gwirionez, 'opiom an emsav', evel ma verk e-unan, oc'h implijout an talbenn am boa roet d'ur pennad bet savet hag embannet ganin e 1961 e-barzh ar gelaouenn "PREDER".

Anat eo ez eo dizenelaus, e soñj Maodez Glanndour, an damant d'an arc'hant, d'an armerzh, d'an araokaerezh danvezel ha na zalc'h kont ebet eus an araokaerezh speredel. War ar bajenn 82 hag ar pajennoù war-lerc'h e ro ar skrivagner skouerioù stank a-walc'h da skeudennañ ar wirionez-se. Restomp amañ un nebeut lavarennoù arouezius hag azonus eus tro-soñjal ar skrivagner war ar c'hraf-se. Lenn a c'hellemp kement-mañ war ar bajenn 82, da skouer : "Darempredoù don a zo moarvat etre arvesterezh ha kultur..." Pezh a fell da Maodez Glanndour reiñ da gompren dre al lavarenn-se eo ez eo ar c'hultur "c'hoari", da lavarout eo, ez eo "gradus" ha n'en deus netra da welout enta gant an "askorusted". Lavarout a ra war ar bajenn 84 : "Ijinañ ur violoù en deus goulennet kantvedoù..." Ne vez ket 'gopret' ar c'hultur enta.

Hogen er pennad a zo talbennet "An istor hag an Hengoun" eo e tag ar skrivagner ar splannañ hag ar fraeshañ tezennoù brudetañ ar varksouriezh, hini "Red ha Ster an Istor" peurgent. Burutellañ a ra Maodez Glanndour ar soñj e ve "brasañ dever an den kemman bepred". pe c'hoazh, "falsvennoz an araokaerezh". A-benn ar fin, dreistpadout a ra bepred an tremened en ur stumm bennak. War ar bajenn 224 e lenner : "An tremened n'eo ket hepken ar pezh a zo tec'het pell diouzhin, met ar pezh a zo aspadet evel hêrezh korfel ha speredel."

N'eo ket an engroez, nag ar yoc'h, nag an armerzh eo a ziviz emdroadur ha tonkad ar pobloù hag an denezelzh. "Dalc'husted" un nebeut tud a-hed o buhez eo a ziviz planedenn ar broadoù. War ar bajenn 225 e skriv Maodez

Glanndour : "An amzer-da-zont a vo ar pezh a raio anezhañ youl bennek un nebeut tud..." Ur pouez dreist a ro ar skrivagner d'ar 'briwerd'h'-se, hini an "dalc'husted". War ar pajennoù 228-229 ne fell d'ar skrivagner gwelout en Istor krouet gant an harozed nemet skeudennadur ar briwerd'h-se. "Ur skol a galonegezh eo an Istor," emezañ deomp, "dreist-holl gant an dalc'husted a ziskouez buhezioù an dud-veur." Dre se ivez ne c'hell ket an amzer-da-zont-se bezañ rakwelet : n'emañ ket anaoudegezh an Istor war bazenn ar skiantelezh enta. Moarvat ez eo kentelius studi an Hanez, gant ma vo ergorel, - "rakvoudel" a skriv Maodez Glanndour. Ret eo, da gentañ, spisverzout an darvoudoù o-unan, "ar c'hoarvoudoù", evel ma skriv an aozer adarre, - hep klask o deveizañ hervez ur rakvarn bennak, met, forzh penaos, n'eus ket a Istor, hogen hepken istorioù, evel maz eus romantoù pe zanevelloù pe gontadennoù, gant un deroù, ur c'hreiz hag un diwezh ! "Divarrekoc'h en em ziskouezo ar poell da zizoleiñ ur ster d'an Istor a-bezh." Ar gristeniezh, kennebeut, n'he deus alc'houez ebet o reiñ ster an Istor evel ur c'hendalc'h didorr, nemet e par an Iliz e ve, ha c'hoazh n'he deus ket an Iliz da gefridi kefleuniañ un istor hollvedel hag hollveziadel, peogwir n'he deus en he mennad nemet salviñ an eneoù a hiniannoù, hep klask kenurzhañ nep kevredigezh nag hi hec'h-unan en ur framm reolet war-eeun ganti ; n'emell an Iliz en Istor enta nemet diwar arbennoù pleustrek-rik, poentel, koulz lavaret, peogwir, dres, e tremen bepred 'dremm ar bed-mañ. "Ar gristeniezh," eme Vaodez Glanndour, "a rofe ur respont meizus war dachenn an deologiezh hag ar relijion," (ha n'eo ket hini an Istor e-unan), rak war dachenn an Istor rik, adarre, "n'eus netra." Forzh penaos, e c'hoarvez berzh ha droukverzh ar galloudoù hag an impalaeriezhoù diwar daolioù "poker", sujet a-grenn d'an dargouezh, koulz ha da lorc'hentez pe zallentez al levierion-bobloù.

E dibenn an oberenn e tistro ar prederour war an dodenn-se a zo pouezus evit an oberourion istorel ez eo an emsaverion. Diskleriañ a ra ur wech ouzhpenn. "Un emskiant kristen eus an istor a zo, disheñvel da

vat diouzh mennozioù ar brederourion, diouzh skridoù ar brederourion, rak an emskiant istorel-se ne sell ket da gentañ holl ouzh emdroerezh ar sevenadurioù, met ouzh o ster hag o finvez."

Hervez ar skrivagner enta, hag evel m'hon eus merket endeo, ned eo ket an Istor ul linenn didorr ; kentoc'h e vefe, evel maz eo bet taolennet gant meur a brederour digristen, un "addistro peurbadus", an impalaeriezhoù o tiglorañ, o vleuniañ, o tizeriañ, o weñviñ hag o vreinan a bep eil, a-wechoù an eil e-tal eben, o tazwerediñ an eil war eben, pe neuze, digenstag a-grenn an eil diouzh eben, evel enezennadoù a sevenadur ; da skouerioù e c'hellfed menegiñ impalaeriezhoù hen Egiptiz, Inkaiz, Aztekiz h.a. en Amerika, skignet war ur rannved ec'hon, hep darempred kenetrezo, ha ken dreistdiraez an eil d'eben ha pa vijent bet lec'hiet war blanedenoù diforc'h. Pezh a fell deomp lavarout eo ne vez ket ganet an Impalaeriezhoù an eil diwar eben ; er c'hontrol, dispartiet e vezont an eil diouzh eben, dres, dre ur seurt esaouenn amzerel-istorel didreizhadus. War ar bajenn 248 e lenner : "A varevezhioù ez echu pep unan gant un taol-reuz skubus, dre gaouadoù, a zo ivez barnedigezh pep sevenadur a ya war vreinañ." Ha pelloc'h e ro ar prederour ur ster d'an taolioù-reuz-se end-eeun : "An taolioù-reuz-se a zo ur rakverkad eus kaouad eskatologel ar Varn Diwezhañ."

A-barzh ma c'hoarvezo ar Varn-se avat e c'hell an istor addiwanañ hep paouez, hep tizhout pal ebet nepred. War ar bajenn 250 e skriv Maodez Glanndour : "Ha koulskoude ne varv ket an Istor ; adstrinkañ a ra goude kantvedoù hiroc'h pe berroc'h ; a-wechoù goude milvloavezhioù." Ha war ar bajenn 251 e ra anv ar prederour eus "retderioù didrec'hus o tont eus an douaroniezh pe eus ar poblañsoù..." Lavaromp adarre ez eo an Istor ur seurt "koantenn e Koad ar C'houk a addeu da vev..."

Bezef pe vezef, ar soñjezon a zlefed evezhiañ outañ eo e vez barnet an Iliz evel ar Bed, diouzh maz eo perzhiek en Istor ar Bed end-eeun, en e vac'homerezh hag en e zireizhderioù holl. Setu pezh a zispieg an aozer war ar bajenn 249 : "An Iliz... eviti puridigezh ha reneve-

zidigezh, Pasion ha Dasorc'h... Evel-se eo ar Varnedigezh : ur mister, ur wirionez bepred bezant ha bepred da zont... Rak dija eo douget ar varnedigezh ; ned eo an Istor nemet ur varnedigezh dizehan eus ar bed, ar Varn Diwezhañ... Diskleridigezh anat ur gendaonidigezh dellezet a bellzo..."

"Petra neuze an istor ? Petra enni buhez an Den ? Un dachenn-arnodiñ..."

Amañ marteze e c'hellfemp ober, adarre, dave da lod gourvojennoù diwar an henamzer evit skeudennaouañ saviad an den en istor, hini Sisufos o poaniañ hep ehan nag astal da ruilhal ur garreg betek lein ur menez, ken na ziruilho houmañ en-dro betek an traoñ, hag an haroz oc'h adregiñ bepred gant e labour aner ; pe hini barrikenn doull didalet a vez an Danaïdennek o leuniañ en aner, hag a chom goull bepred : n'eus kefleuniadur ebet d'an Istor.

Edomp o komz eus barnedigezh an Iliz. Moarvat ez eo an Iliz 'ta sujet d'ar saveleñoù a reizh buhez ha marv kevredigezhioù an dud ; da lavarout eo, tremen a ra dre brantadoù a verzh hag a zroukverzh, dre varevezhioù a zigloradur, a vleuniadur hag a grinadur, nemet an diforc'h a zo etrezi hag ar c'hevredigezhioù denel all eo ez eo heñvel ouzh labous eorizhel ar C'hresianed, ar Feniz : diwar al ludu anezhi hec'h-unan e vez adc'hanet bepred.

Barnet e vez an Iliz enta, met ne vez ket barnet dres evel ar Bed e-unan, evel ar peurrest eus kevredigezhioù an dud. Ar mennoz-se eo a zo displeget deomp gant ar skrivagner war ar bajenn 197 : "Diouzh ret\* en em gav an Iliz war dachenn ar politikerezh, rak ur vent politikel a zo dezhi, ha lavarout n'he deus ket an Iliz d'ober politikerezh a zo ur fazi."

Ne c'hell ket an Iliz enta tec'hout diouzh ar politikezh, nemet, ha setu an arvar, war zigarez difenn he lazoù evel kevredigezh, dre ma fell dezhi dreistpadout evit kenderc'hel da seveniñ he c'hefridi, e c'hoarvez gant he renerion pe hec'h atebeion, pe zougen barnadennoù faos a-zivout ar saviad m'emañ ennañ ar gevredigezh a zo en o c'harg, pe asantiñ da zireizhderioù a bep seurt,

gant ar spi da vezañ lezet e peoc'h da gas da benn he c'hefridi, nemet seurt koulzelouriezh, na petra, a c'hell sachañ warni, evel kevredigezh, trubuilh hag heskinerezh, a zo eviti ivez mammenn a buridigezh. Adarre war ar bajenn 197 e lennomp : "An dud a Iliz... Ur politikerezh faos ha digristen a c'hellont ober, int-i o-unan, hag e reont, dre sotoni, laoskentez, dre c'hoant galloud..."

Rak denel eo an Iliz evit darn, hag evel ma verkemp e deroù ar rannbennad-mañ, hag evel ma verk Maodez Glanndour e-unan, war ar bajenn 198 : "An Iliz hec'h-unan a rank implijout emlusk an emgevredin evit he finvez hec'h-unan."

Diouzh un tu all ne c'hell ar c'hevredigezhioù denel ordinal bezañ lodek er seurt trebadusted a zo debarzhet d'an Iliz, nemet o kemer perzh en ur stumm bennak en he buhez. Diziquerus eo ar feiz kristen da sevel kevredigezhioù stabil ; ne bad ar broadoù nemet e kement ha maz eo stag o zonkadur ouzh hini ar gevredigezh maz eus ganti promesa ar beurbadusted er bed-mañ da gentañ. Ezhomm a vez bepred enta, en holl vroadou-se, eus un "Dispac'h kristen". Ret eo restañ amañ un arroudenn hon eus bet tro da venegiñ end-eeun, diwar ar bajenn 271 : "Ne vo adsavet ar gristeniezh amañ nemet pa vo adsavet war un dro kement a zo amañ kevredigezh kristen, ha distrujet kement a zo evit ar vro galloudoù a varv."

Gwazhwelour a-walc'h eo Maodez Glanndour a-zivout an darempredoù a vez diazezet dre ret etre an Iliz hag ar Stad. Perak ? Peogwir e c'houlenn an Iliz e kavfe ar Stadoù o sichenn e pennaennoù an Aviel. Lavarout a ra ar skrivagner, da skouer, war ar bajenn 199 : "An dek gourc'hemenn n'int ket hepken diazez buhez personel an den, gwarantiz e gempouez hag e vleugnidigezh... Bezañ int ivez diazez buhez ar Stadoù."

Dre se o deus an holl c'halloudoù disfiz ouzh aotrouniezh speredel an Iliz, a denn a-walc'h d'ur veliezh-diwall-minor, hag a-se o deus arnodet a-viskoazh pe he sujañ, pe he zrevadennañ, pe zisleberiñ he c'helennadurezh en ur ober van d'he degemer (hag hemañ eo an degouezh

liesañ er c'hantvedoù tremenet er Stadoù diwanet war zismantroù ar C'hristenva, dreist-holl abaoe amzer an azginivelezh ): ha pa ne c'hellont dont a-benn anezhi dre gaer, neuze e heskinont anezhi hag e klaskont he distrujañ. Merkañ a ra Maodez Glanndour adarre, war ar bajenn 197 : "Ha setu perak e vez santet gant mestroni ur Stad hollveliourez emañ kontrol dezhi pep relijion, ha dreist-holl ar Gristeniezh. N'eo ket hep abeg don e vefe ur Stad varksat a-enep krenn d'an Iliz."

Ha neuze, peseurt darempred a zo etre ar bed-mañ hag ur bed all, a zo war un dro ur c'hendalc'h, pe ur peurbadeladur anezhañ, evel un eost skarzhet dioutañ an dreog, evit mirout hepken ar gwinizh, hag a zo ivez ur seurt barnedigezh eus "bed an arnod hag an aprou" a-rae Maodez Glanndour meneg anezhañ e-barzh "Imram". Soñj a zo ivez eus un arroudenn all eus "Imram": ma oa taolennet enni "dasorc'hidigezh ar Brezhon" gant e yezh en e c'henoù h.a., digolladur en ur bed all eus an dismegañs gouzañvet gant ar geizh er bed-mañ, e-giz hini ar Paour en Aviel, Arsteriekoc'h hag hollekoc'h eo ar wech-mañ mennoz Maodez Glanndour war ar c'hraf-se, ha ne glot ket penn-da-benn gant an hini displeget gantañ daou-ugent vloaz kent. Un darn hepken eus ar bed a vo peurbadelaet ha buhezekaet da viken, a soñje a-walc'h ar prederour erru en e gozhni. Lenn a reomp war ar pajennoù 249-250 : "Ha koulskoude, un dra bennak a vo salvet bep tro, hag a vo salvet e fin ar bed, un dra bennak eus an holl grouadelezh, eus an holl sevenadurioù o-unan, rak int a zo stag ouzh an den e-unan, evel al loened, ar plant, an natur a-bezh."

Ma komprenan mat mennoz ar skrivagner, kement kened krouet gant Doue a beurbadfe, rak Doue ne c'hell ket renaviañ e oberenn hep en em renaviañ e-unan, hep en em zistrujañ e-unan. Kavout a ra din avat n'en deus ket Maodez Glanndour kredet kas re bell e breder. Rak e degouezh an denelezh, ar gudenn a sav eo ez eo-hi par da Zoue en ur stumm, hag e c'hell mat-tre klask sevel he bed hec'h-unan, evel un emsavadenn hag un daadenn ouzh Doue e-unan. Dre se ne c'heller

ket lakaat war an hevelep pazenn bed an natur ha bed an den a zo diforc'h-krenn dioutañ, en abeg da rezid mab-den end-eeun.

A-benn ar fin, ne zlefe dreistpadout, e par an den e-unan, nemet kement en devo servijet dezhañ da enoriñ ha da servijout Doue, e Grouer, e par an hiniennoù 'ta, ha n'eo ket e par ar c'hevredigezhioù pe ar sevenadurioù a zo barnet da vont da get, ne vern kement a c'hoarvezo.

Moarvat e vije bet gwell enta ober un diforc'h etre Iliz en Istor, un Iliz feal da youl he diazezer, hag ur bed dianavezet pe zistaolet Doue gantañ, maz eo barnet pep sevenadenn anezhañ, diouzh ma tiwan diouzh kamm-youl an emlorc'h hag an emgerc'hegezh, d'an dispennadur ha d'an netraidigezh. Damwelet en deus Maodez Glanndour ar gudenn moarvat, met n'en deus ket kredet kregiñ d'he dirouestlañ, marteze dre m'en em sante perzhiek, en un doare bennak, evel kalz kristenion all, en un Istor ha n'oa netra santel ennañ, erziwezh. Hogen anzavomp ez eo an holl gristenion kiriek d'hevelep gwailvesk, diouzh ma nac'hont ober ur c'hemm groñs etre Istor ar Bed hag Istor an Iliz, petra bennak ma teu ar c'hemm-se da vezañ anatoc'h-anatañ en hon amzer.


#### Evit echuiñ

Daoust ha talvezout a ra ar boan reiñ ur c'hlozadur d'ar studiadenn-mañ ? E gwirionez ez eo bet buhez ha tonkadur Maodez Glanndour dreistret a-grenn. Setu un den, ma n'en dije ket kejet gant an emsav, en dije bet, marteze, ur redamaezh enorus-meurbet en Iliz c'hall ; me ' lavar "marteze", rak, o prederiañ, em eus douetañs e vije bet lezet da sevel betek an eskobelezh en abeg d'e 'hengunelouriezh' katolik ha na voe ket mui diouzh ar c'hiz en Iliz c'hall a-c'houde dibenn ar brezel diwezhañ. koulz lavaret, Bezet pe vezet, soñjal a-rae ar brogarour-mañ e tifenne ar feiz katolik o tifenn ur vro a oa bet katolik a-hed hec'h istor, miret ganti ar feiz evit ar pep brasañ eus he foblañs, betek ar brezel diwezhañ bepred ; ha sur eo he deus roet dizoioidigezh an emsav

d'ar skrivagner-mañ, dres a-raok ar brezel, a-dreuz oberenn Roparz Hemon, ur merzad a zieubidigezh e-keñver ar falsvroad dizoue e oa deuet ar vroad c'hall da vezañ. E-pad ur pennad en deus kredet an emsaver kristen-mañ e oa a-walc'h dieubiñ Breizh evit saveteiñ pep tra, ha peurgent, ar feiz e Breizh. En e vleud en deus en em gavet en un emsav ha na zifenne mui, a-benn ar fin, nemetañ e-unan, peogwir e oa distrujet ar bobl gristen e oa sañset difenn er penn-kentañ, un emsav, forzh penaos, hag a oa deuet ivez da vezañ digristen e-unan dre ma teue d'an oad-gour ar rummadoù yaouank. E dibenn e vuhez hepken en deus meizet ar skrivagner e oa kalz hollekoc'h hag hollvedeloc'h an enkadenn ma reuzie outi ar bobl vrezhon eget n'en doa soñjet da gentañ. N'eo ket Bro-C'hall hepken, evel bro zoken, a oa kiriek da ziskar hor pobl ha da zistrujidigezh ar feiz, hogen un emsav digristen hollvedel, lakaet en e blom, hep gouzout, gant rouaned sañset kristen, e Bro-C'hall dreist-holl, moarvat, met ivez e broioù arail penn-da-benn d'ar voull-douar.

Gwir eo ez eo marvet re abred ar brogarour-mañ evit kompren e oa ezhom, evit adsevel ar feiz, an liz ha broadoù kristen en-dro, eus un emsav nevez, a zo c'hoazh da grouiñ ha da urzhiañ, e Breizh da gentañ, moarvat, met ivez en Europa hag en hollved penn-da-benn. Da get e tle bezañ kaset gant an emsav-se ar patromoù politikel, stuzegezhel ha speredel o deus kemet o c'hreñv er bed a-bezh, ha kaset anezhañ war ribl an islonk. Er stourm didrugarez a vo da ren e tle emsav Breizh kaout al lec'h kentañ, ha bouc'hañ un emgann ha na c'heller mui, diwar vremañ, tec'hout dioutañ, ma fell deomp dreistvevañ evel Brezhoned

Y.O.



Atodenn

Amañ da heul e roomp ur roll lod gerioù arveret gant

ar skrivagner e-barzh "Kregin-mor", ha na gaver ket e geriadur Roparz Hemon, pe a zo dibaot e stumm pe stumm ; o renket hon eus hervez urzh al lizherenneg. Akademielezh, aljebrek, anien, amnaturel, ampegad, amsteriek, arallekaet, arboellerezh, arboellour (armerzhour), armerzh, armerzhel, arackadur, arackaerezh, arackaour, arouezelezh, aroueziadurezh, arzelezh, aseentez ["aseitas"]. Bedoberour, boudoniel, boudoniezh, braeër-kaozioù, bred. C'hoarvoudenn, Damvezout, daouduegezh, daouduek, daousteriek, dasrannañ (evit "dezhannañ"), dastaol ["dre zastol" ; "réflexe"], dec'halvus ["évocteur" ?], denelouriezh, diabarzhelezh, dialañ ["en em zialañ"], diavaezelezh, dibarelezh, dibened, dibennger, dielfennañ, difetisadur, digempouezadur, digleuziañ, disevenaat, diskouezataet, diskoulmadur, disreolenn ["exception" ?], diveliour, divventek, douarouriezh, dreistnaturel, dreistweladurezh, drougemdroerezh, drouknerzh, Echuadenn, ekonomikel, emanaoudegezh, emboudelezh ["caractère immanent"], emdolzidigezh ["massification" ?], emdroadurour ["un évolutionniste"], emdroerezh ["évolution"], emgevrediñ ["s'associer"], emoberour, emsavadeg, emskiantel, emfiziañs, emlusk, emobererezh, emreizh ["morale"], emreizhel, emreizhelezh, emyoul, emzalc'hadur ["cohésion" ?], eneoniell ["donder" ; "psychologique" ?], enklaskerezh, erozegezh ["érotisme"], eskatologel, estaoladur, esteurel ["eztaoliñ"], evezhiegezh, Farodiezh, falstaolennadur, feulsentez, frammadur, Gagouilherezh, ganadur, geriaouel, gourfennger, greanterezh, gweladurour ["visionnaire"], gwirvoud, gwirvoudel, gwirvoudelezh, Hañvaladur, harozel, hengounour ["hengounelour"], hiniennour ["hiniennelour"], holladegezh, hollevezhiek ["Stad"], hollveliourez, hollwelerezh, ljinadur, imbourc'h, iskister, istrogellerezh, Kadarnidigezh, kammgemer ["faziañ"], diwar ar c'hembraeg, "droukveskañ", kealdresadenn, kenaozet, kendegouezh, kenadoniel, kenemlec'hiadur, kenstrollad (a sinoù), kenstumm, kentaelezh, kevreadurezh, kloterezh, konsept, koñsevet, komzenebiezh, kontroliezh ["dislavar", "a gontroliezh gant"], krennlavaret, Lavarel, lenneg ["kefredour"], liesventek, linkusted, logikelezh, logikour, luskad, markse-



lezh, mastaradur, meizelezh, meizoniezh, mekanikelezh, menoziadouriezh ("idealouriezh" ?), mentadurezh, merzadur, moraliezh ("kentel da dennañ"). Nann-asantour ("digemplegour"), neradenniñ, neriñ, nerzhelezh ("gremm", "énergie"). Ontologel. Padelezh, paradurezh, poellatae-rezh, poellegadur, poellegezh, poellegouriezh, prederourel, produadur ("kenderc'hadur"), produiñ ("kenderc'hañ"), Ragijinañ, rakger, rakvarnadenn, rakvennoz, rakvoud, rakvoudel ("ergorel"), rakvoudelezh ("ergorelezh"), reizhad (evit "reizhiad"), reizhelezh, reizhpoellegezh, respetiñ ("doujañ"), rezon ("poell"). Setañsel, sevenaat, soñjadenn, soñjerezh, \*stabiliañ, strabouilh, strog ("dramm"), stuzegezh. Talvoud, taol-reuz (1968), teknikelezh, tolzennat, tolzidigezh, touellerezh-lagad, travoud ("gwerch'h"), travoudel ("gwerch'el"), travoudelaat, tregorfoniel, treuzkenteliezh, tromplezon. Uhelberzh, uheldezennek, uhelgelenner, uhellezenner, uhelvenoziadurezh, uhelvenozour ("idéaliste" ?), uhelvad, uhelvar, uhelvreudel (diwar "breud" moarvat), uhelvro, uhelvoudel, undoareaat, undoareidigezh, unpezh, usvoudelezh.


SSSSSSSSSSSSSSSSSSSSSSSSSSSSSSSS

NOTENNOU

\*"diouzh ret". Ret eo kounañ ez implij ar skrivagner an droienn-mañ gant ar ster "dre ret" ; peurvuiañ e talvez "diouzh ret" : "hervez ma vo ret".  
 \*\*"fenomen". Ar ger implijet peurvuiañ hiziv a zo "anadenn" ; alese : "anadennoniezh", skiant an anadennoù pe "fenomenogelezh". Dont a ra ar ger "fenomen" eus ur verb gresianek a talvez "hañvalout", "seblantout". War-dro ar brezel en doa arveret Maodez Glandour ar ger "diskouezataet" evit talvezout "bed an anadennoù", e burutelladur levr R. Jestin e sigur ar "Bouddha hag ar Vouddhaadegezh".

(-)(-)(-)(-)(-)(-)

**Treuzkaserezh ar feiz  
 ha mammenoù ar feiz**

**Prezegenn bet roet  
 gant an Aotrou Kardinal Joseph Ratzinger  
 bet arc'heskob München,  
 karget gant ar Pab  
 kelennadurezh ar Feiz**

Komzoù diwezhañ an Aotrou d'E ebestel o c'hefridie da vont dre ar bed a-bezh da ober diskibled (Mt. 28, 19S ; Lk. 16,15 ; Ob. 1,7). Ur perzh a-ziabarzh d' ar Feiz eo a ra dezhi goulenn bezañ treuzkaset : diabarzhkadur ez eus dre maz eo stag ar c'hemennadur da brezeg ouzh keal ar Wirionez, ha dre ma ne c'hell den ebet bezañ salvet hep ar Wirionez (I Tm 2,4). Setu perak ez eo bet treuzkaserezh ar feiz, ar c'hatekizerezh, adalek an deroù, ur gefridi a vuhez evit an Iliz hag e tleont chom keit ha ma pado an Iliz.

**Enkadenn ar c'hatekizerezh  
 ha kudenn ar mammenoù**

**1. An enkadenn dre vras**

Anat eo d'an holl ez eus bremañ diaesterioù er c'hatekizerezh. Meur a wech ez eo bet dezrevellet abegoù hag heuliadoù an enkadenn. E bed ar galvezouriezh, a zo un dra krouet gant mab-den e-unan, - n'eo ket gant Doue-Krouer e kejer, met bepred gant mab-den e-unan hepken. Frammadur-diazez ar bed-se a zo bout "graus" ; n'eo diarvar evitañ nemet ar pezh a c'heller jediñ. Setu perak ne sav ket evitañ kudenn ar silvidigezh e par Doue ha na vez ket anv anezhañ, met e par galloud mab-den a zo mennet d'en em ober e-unan ha d'ober e Istor. Merkoù-barn ar vuhezegezh-vat ne vezont ken klasket en un danevell a-zivout ar groudigezh pe ar C'hrouer a zo aet da zianav. N'eus er c'hrouiñ talvoud divezel ebet, met un dalvoudegezh kalvezel lavaret

gant sifrou. Krouadelezh Doue avat a vez displeberet gant an dud ; met divezegezh an amvevadourion a chom amresis : a-benn ar fin ned eo ar vuhezgezh-vat evit un den nemet bevañ e peoc'h gantañ e-unan ha gant ar pezh a zo tro-dro dezhañ. Sellet evel-se ez eo deuet ar vuhezgezh-vat da vezañ un afer a jediñ an ampegadoù gwellañ evit an dazont. Diwar se ez eo bet kemmet don ar gevredigezh ; an tiegezh, a zo stroll-diazez ar sevenadur kristen, a ziskouez bezañ peurliesañ war hent an displeberañ. Pa ne roer talvoudegezh ebet d'al liammoù trabedoniell, ne c'hell ket al liammoù all derc'hel pell amzer. Ar yoc'hstlenn a zastaol hag a vag ar skeudenn nevez-se eus ar bed. Merket e vez spered mab-den hiziv muioc'h gant ar skeudenn eus ar bed hag eus an darvoudoù roet gant ar yoc'hstlenn eget gant skiant-prenet pep hini. Gant kement-se e vez levezonet ar c'hatekizerezh, a sell evel dismantret kement tra a harpe ar gevredigezh kristen a-wechall, hep gallout en em harpañ war ur skiant-prenet eus ar Feiz buhez et en un Iliz vev. Doare a zo gant ar Feiz bezañ rediet da chom mut en ur mare ma ne vez maget ar yezh hag ar spered nemet gant skiant-prenet ur bed a venn bezañ e grouer dezhañ e-unan.

Ar feizoniourion war ar pleustr o deus en em ouestlet da ziskoulmañ ar c'hudennoù-se e-doug an dekvloaziadoù tremenet, e sell da verkañ da dreuzkaserezh ar feiz hentoù nevez o klotañ gwelloc'h gant ar saviad nevez. Kalz anezho, a-dra-sur, o deus merzet abaoe e oa bet gwashaet kentoc'h eget gwellaet d'an enkadenn dre o labourioù. Direizh e vefe lavarout an dra-se diwar-benn an holl ; ken direizh all e vefe lavarout n'eo ket gwir tamm ebet. Ar fazi kentañ ha grevus a voe lemel kuit ar c'hatekiz, ha diskleriañ e oa fall evit hon amzer an avielerezh dre ar c'hatekiz. Gwir eo n'eo deuet ar c'hatekiz da vezañ ul levr boas nemet e mare an Adreizh. Hogen treuzkaserezh ar Feiz evel frammadur-diazez, diwanet diouzh reizhpoellegezh ar Feiz, a zo ken kozh hag an Iliz, pa gatekized an danvez-kristenion en he deroù. Natur eo d'an Iliz treuzkas ar Feiz. Paouez a dreuzkas ar Feiz evel frammadur-diazez, gwriziennet

don e mammennoù an holl Hengoun, en deus lakaet embannerezh ar Feiz da vont e bruzun. Pep hini a c'helle kelenn evel ma plije dezhañ, hag al lodennoù a blije dezhañ, evel pa c'hellje an hollad maz eo ar Feiz bezañ lodennet a dammoù estren an eil ouzh egile.

Perak bezañ graet ar fazi-se ken prim hag e pep lec'h ? Evit abegoù a bep seurt ha n'int ket bet ensellet mat betek-henn. Unan eus ar re gentañ eo moarvat ez emdroe diouzh o zu ar c'helenn hag ar gelenouriezh dre vras, techet bremañ da reiñ re a bouez d'an hentenn pe d'an doare-kelenn, e-skoaz an danvez da gelenn. Diouzh ar 'c'harr-samm' e varner bremañ ar varc'hadourezh ! Diouzh ma c'houlenn ar skolidi e vez kinniget dezho : setu penaos e vez termenet hentennoù ar c'hatekizerezh da geñver an tabut a zo savet diwar-benn ar "c'hatekiz hollandat". Setu perak e voe ret chom war zanveziou-kelenn eeunik, mat evit deskarded o kregiñ, e-lec'h klask an hentoù da vont pelloc'h, ha da dizhout ar pezh na oa ket bet meizet da gentañ, an hentenn nemeti a c'hell kemman un den e gwirionez, hag ar bed. Evel-se e voe seizet ar galloud-kemman a zo e djabarzh ar Feiz. Diwar neuze e teue ar feizoniezh pleustrek da vezañ meizet, n'eo ket ken evel un diorreadur fetis eus ar feizoniezh bongoelek pe reizhiadek, met evel un anaoudegezh o talvezout drezi hec'h-unan, - ar pezh a glote adarre gant un tech-soñjal a-vremañ : isuzhiañ ar wirionez d'ar pleustrerezh, d'an "niderezh" ("praksiz"), un tech-soñjal a doullas e hent er feizoniezh zoken, da heul giz ar prederouriezhoù nevez-varksek pe hollverzadour.

Kement-se holl a strishae kalz an denoniezh : reiñ muioc'h a bouez d'an hentenn eget d'an danvez studiet a dalv ez eo mestrez an denoniezh war an doueoniezh, en doare ma voe ret da houmañ kavout he lec'h en un hollad skiantoù a laka an den e-kreiz pep tra. Dre ma strishae an denoniezh e voe roet muioc'h a bouez da rannoù all ar ouiziegezh ; da verkoù-barn ar Feiz hag an Dasroadurezh e voe lakaet ar gevredadoniezh a rene e pep lec'h, pe c'hoazh, kentaagezh an anaout-dre-verzout.

Dre an abegoù-se, ha dre abegoù all ez eo bet nac'het ar c'hatekiz ha dismantret ar c'hatekizerezh klasek ;

Dre an abegoù-se, ha dre abegoù all ez eo bet nac'het ar c'hatekiz ha dismantret ar c'hatekizerezh klasek; donoc'h avat ez a an argerzhad-meizañ. N'eur ket ken kalonek a-walc'h evit kinnig ar feiz evel hollad kenaozet, met hepken evel adskedoù dibabet pleustrezhioù denoniezhel darnek, peogwir e vager disfiz ouzh an holladelezh, ouzh ar Feiz, - gwelloc'h c'hoazh, ouzh Feiz voutin an Iliz a-hed an holl gantvedoù. Setu perak e tremened peurliesañ hep kelenn ar gwirionezioù da grediñ enno, hag e klasked adaozañ ar Feiz diwar ar Bibl war-eeun. Hogen petra eo ar gwirionezioù da grediñ enno, ar "bongoel", nemet diorreadur ar Skritur? Hogen doare a oa gant an diorreadur-se, diwanet diouzh Feiz ar gristenion a-hed ar c'hantvedoù, bout divarrek da glotañ gant ar pezh a gomprened en testennoù hervez an hentenn istorel nevez. Bez' e oa daou zoare diorreadur enebet a-grenn, diouzh ur gwel: an diorreadur dre an Istor, hag an diorreadur dre ar gwirionezioù da grediñ enno. Hemañ avat, hervez ar meizadurioù a-vremañ, ne c'helle bezañ nemet un diorreadur rak-skiantel, da-c'hortoz, ampad. E pelec'h e glenkañ a-hend-all, en ur bed na sell evel diogel, ha zoken, gallus, nemet ar pezh a zo skiantel? Pe neuze, e lakaat war gont ensavadurioù o treistvefañ ha c'hoant ganto mirout o galloud? E dalvoudegezh a zo da vezañ mentet diouzh reolennoù an devarnouriezh skiantel; talvezout a c'hell zoken da harpañ houmañ; he barn avat ne c'hell ken.

## 2. Katekizerezh, Bibl ha Bongoel

Setu ni degouezhet e-kreizig-kreiz ar gudenn: peseurt lec'h reiñ d'ar mammennoù pa vezer o treuzkas ar Feiz? Ur c'hatekizerezh hag a zisplege ar Feiz war-eeun, koulz lavarout, diwar ar Bibl, hep tremen dre reizhiad ar gwirionezioù da grediñ enno, a c'helled lavarout war e zivoud e oa ur c'hatekizerezh deveret dreist pep tra all eus ar mammennoù. Met neuze e choarvezas un dra iskis. Nevezded ar mont war-eeun d'ar Bibl ne badas ket. Gwir eo e voe da gentañ pinvidikoc'h, kaeroc'h, frouezhusoc'h treuzkaserezh ar Feiz. Klevet e veze

"c'hwezh douar Palestina"; advuhezet e veze reuziad Mab-den a zo e penn-orin ar Bibl. Deneloc'h ha fetisoc'h e voe an traoù. Hep dale, koulskoude, e teuas anat e oa daou benn d'ar gudenn, evel ma oa bet skrivet gant J.A. Möhler en un doare klasek kant-hanter-kant vloaz kent. Lavarout a ra ar pezh a gaerder hag a nester a zegas ar mont war-eeun d'ar Bibl, ha na c'heller ket dioueriñ: "Hep ar Skritur e chomje kuzhet doare dioutañ-e-unan komzoù Jezuz; ne ouijemp ket penaos e komze Mab-an-Den, ha kavout a ra din ne blijje ket din derc'hel da vevañ mar n'henn klevjen ken."

Hogen merkañ a ra Möhler diouzhtu penaos ne c'hell ket ar Skritur bezañ disrannet diouzh ar gumuniezh vev n'eus nemet enni e c'hell bout "Ar Skritur", pa gendalc'h: "Hogen hep an Dasroadur, ne ouijemp ket zoken piv a gomze evel-se neuze, na petra gemenne, hag al levenez a zeu eus e zoare da gomz a vije ivez steuziet."

Diouzh ur savboent disheñvel e kaver e levr Albert Schweitzer war buhezskridoù Jezuz un dezrevell eus hevelep emdroadur ur c'hatekizerezh stag ouzh studi lennegel ar mammennoù: "Iskis eo ar pezh a zo c'hoarvezet gant an imbourc'herion war vuhez Jezuz. Aet int da glask ar Jezuz istorek ha krediñ a reas dezho e c'hellent henn adlec'hiañ e-lec'h ma oa, en hon amzer, evel Mestr ha Salver. Diskoulmañ a rejont al liammoù en unane abaoe kantvedoù ouzh roc'h kelennadurezh an Iliz, ha laouenaat a raent o welout ar skeudenn anezhañ o tapout buhez ha fiñv en-dro, o tonet en arbenn dezho. Met setu ma ne chomas ket a-sav, ma tremenas e-biou d'hon amzervezh ha ma tistroas d'e hini."

Evit gwir, an argerzhad-se, a grede da Albert Schweitzer bezañ lakaet un termen dezhañ er feizoniezh, a zeu en-dro atav gant doareoù nevez ha liesstumm er c'hatekizerezh arnevez. Rak, an dielloù a vened lenn war-eeun gant harp nemetañ an hentenn istorel, a bellaas en un taol war an hed a zo etrezo hag an darvoud istorek. Hendraouriezh ha mirdi traoù kozh e teu da vezañ an devarnouriezh na vuhez ken na veiz ken ar Bibl dre ar c'henaoadur bev maz eo an Iliz.

Henn gwelout a reer anat pa n'eus ket ken eus ar Bibl ar Bibl, met un teskad levrioù hep liamm etrezo. Penaos ober neuze gant seurt lizheradur ha diwar beseurt sturiennoù dibab an testennoù evit ar c'hatekizerezh ? Anat eo pegen buan ez eo emdroet an traoù, pa weler, da skouer, ul lenner o c'houlenn en ur gelaouenn, ma vefe moulet, en embannadurioù nevez a'r Bibl, e lizherennoù bihan kement a zo aet didalvoud, hag e lizherennoù bras ar pezh a chom talvoudus ? Hogen petra a zo talvoudus ? Petra a zo aet didalvoud ? A-benn ar fin e tibab pep hini hervez e vlizidigezh, hag ar Bibl ne vo mat nemet da sevel a-du gant ar pezh a blij deomp en a-raok.

Un doare all ez eus da zisleberin ar Bibl. En ur glask elfennoù koshañ un destenn, ar re nemeto lakaet da ziarvar ha spletus, e kejer gant mammennoù koshoc'h adijinet diwar ar Bibl, hag a seller evel pouezusoc'h eget ar "Vammenn". Kontet eo bet din gant ur vamm edo he mab, skoliad kentañ derez, krog da studiañ ar gristologiezh, a zo "mammenn" sañset "logia" an Aotroù ; met eus ar seizh Sakramant, eus gwirionezioù ar Gredo, n'en doa klevet anv ebet biskoazh.

**Kardinal Joseph RATZINGER**

**Arroudennoù aozet e brezhoneg  
gant Pol KALVEZ**

**Notenn.**

Albert Schweitzer a zo ur feizoniour elzasat protestant eus deroù ar c'hantved. Skrivañ a reas e oberennoù en alamaneg.

"\_ \_ \_ \_ \_"

**Ar stourm poblek evit ar brezhoneg  
e-pad ar brezel diwezhañ  
bet renet dreist-holl gant "Bleun-Brug" Y.V. Perrot,  
hag e Leon dreist-holl.  
Amañ da heul ez adembannomp ur brezegenn  
bet moulet war ar gelaouenn "ARVOR",  
er bloaz 1943.**

**Sulvezh ar Brezhoneg e Kleder**

**KOMZ BREZHONEG  
OUZH AR VUGALE**

Emban a reomp amañ ar brezegenn graet gant Mari  
an Duff, eus Plonevez-Lokrist, ha distaget ganti d'ar  
7 a viz Meurzh diwezhañ, da geñver **Sulvezh ar Brezhoneg.**

**"Lakit en hol liorzhoù kalz a vleunioù,  
Ha d'o c'hutuilh, en o c'haer, kalz a vugaligoù."**

C'hoant am befe da lavarout hiroc'h eget Marianna Abgrall\* : ra vezo klevet ar vugale-se o komz, o kanañ, o pediñ Doue e brezhoneg.

Va mignonezed,

ar pezh a ra ur vro, ar pezh en laka da vezañ disheñvel diouzh ar broioù all, eo da gentañ, ha dreist pep tra, he yezh. Ur bobl a c'hell bezañ gouarnet gant diavaezidi, met keit ha ma talc'h he yezh, e talc'h etre he daouarn alc'houez aour he zi.

Ni a zo mibion vihan ur bobl sebezus : rouantezhioù kaer a zo bet savet gwechall gant hon tud kozh e Breizh-Veur, du-hont en tu all d'ar mor, hag amañ e Breizh-Vihan ; diskaret int bet an eil goude eben. Met un dra a zo hag a zo bet savet ganto hag a chom atav ganeomp, hag eo o yezh. Eus genoù ar vamm o vervel eo kouezhet e genoù ar verc'h, hag eus genoù ar verc'h, e genoù ar verc'h vihan. Treuzet he deus ar c'hantvedoù hep koshaat tamm, hag hiziv, koulz hag er pempvet kantved, e c'hellomp lavarout gant ar barzh Taliesin :



"Hon Doue a garomp ; hor yezh a viromp."

Hag un dra gaer eo an dra-mañ, rak pa virer ar yezh e virer ar pep gwellañ eus ar pezh a ra ar ouenn. Ar yezh eo ene ar vro ; hi eo banniel bev ar vroadelezh.

Pell hag hir amzer omp bet ha ne daolemp ket a evezh a-walc'h ouzh an teñzor-se m'eo ar brezhoneg ; ha c'hoant am eus da lavarout zoken ez eus, en deiz a hiziv c'hoazh, e-leizh a Vretoned, ha pa gomzer dezho eus traoù o bro, a zo ken dall hag an den bet ganet dallañ. Sklerijen-nañ an dudoù geizh-se, setu aze kefridi plac'hed yaouank ha priedoù yaouank Breizh.

E pep bro e kaver tud reuzeudik ha n'o deus ket a ezhomm e kinnigfed dezho tregont diner evit gwerzhañ o bro : e Breizh int stankoc'h c'hoazh, marteze, eget e bro all ebet war an douar, met al levrioù, ar c'hazetennoù, an dud a zo o chom er c'hêrioù, ne zeuint morse a-benn eus hor gouenn, keit ha ma chomo en o sav tud yaouank ha mammoù kristen e Breizh. Ar re-mañ eo dreist-holl gwellañ skoazell ar vro, ha keit ha ma komzint brezhoneg d'o bugale, n'eus ezhomm ebet da gaout aon evit an amzer-da-zont.

Siwazh, a nevez a zo ez eus daou gleñved lous oc'h en em skignañ dre Vreizh : lorgnez an **dizoueañ** ha lorgnez an **divrezhonegañ** ; daou gleñved hag a ya da heul, hag a vezo atav o tigeriñ hent d'egile. Ya, Breizh, bro ar sent, a zo oc'h en em zizoueañ a nebeudoù. E tiez a zo e weler bremañ kristenion o vont d'o gweleoù, diouzh an noz, hep pater na noster, evel ur bern tousegi o vont d'o zoulloù. Penaos eo kouezhet ar Vretoned-se ken izel all ? Divrezhonekaet eo bet ar vugale gant ar gerent, hag ar vugale, d'o zro, |o deus| dizoueeet o c'herent. Penaos e vo pedet el lec'h ma ne oar ar gerent nemet pedennoù brezhonek, hag ar vugale pedennoù gallek ? Breizh a zo diazezet war ar brezhoneg hag ar feiz ; ma lamit unan pe unan eus an daou vaen-diazez-se e kouezho en he foull, ha setu perak, brasañ torfed a c'hell ober ur vamm e Breizh, goude mougañ ar feiz e kalon ar bugel, eo mougañ ar brezhoneg en e c'henoù. Ar vamm hag ar plac'h yaouank o deus bet brezhoneg digant o zud, - n'eo ket evito o-unan o deus bet an teñzor-

se, met roet eo bet dezho evit m'en rofent, d'o zro, d'o bugale. Ha pa welan mammoù ha plac'hed yaouank, anvioù breizhat eus ar re gaerañ dezho, gwad breizhat eus ar re yac'hañ dezho o redek en o gwazhied, o c'halle-gat ouzh o bugaligoù pe ouzh o breudeur, ez a kounnar ennon. N'eus ket da lavarout nann : Bretoned omp ; un anv eo hennezh ha n'eus ket da gaout mezh ouzh e zougen ; chomomp eta Bretoned penn-kil-ha-troad.

Hag arabat da zen krediñ e vefen enebourez d'an deskadurezh war zigarez ma tifennan gwirioù ar brezhoneg. Pell emañ diouzh eno, rak seul vui e vo desket ar Vretoned, ha seul vui e karint o bro hag o yezh ; ma n'en greont ket peurliesañ eo kentoc'h dre zallentez eget dre fallagriez. Deskiñ ur yezh eta estreget hini hor bro a zo mat ? Ya. Ha div ? Gwelloc'h c'hoazh, gant ma ne zeuint ket da zistroadañ ar brezhoneg hoc'h eus desket war varlenn ho mamm. Derc'hel d'hor yezh hag en c'harout dreist d'an holl yezhoù all ; en lakaat da vestrez en hor spered, hag ar yezhoù all da blac'hed dindani ; en skrivañ dalc'hmat, en pinvidikaat, en c'homz e pep lec'h, ouzh kement hini en anavez, hep mont e galleg nemet an nebeutañ ma c'hellimp, setu aze petra a dle pep gwir Vreizhadez da ober, ma fell dezhi e chomfe he bro en he sav.

Ur yezh hon eus, ha n'eo ket da bobl all ebet, hag a zo hor yezh, savet m'eo bet gant hon tud, ha p'en c'homzomp, emamp er gêr. Dante, barzh brudet an Itali, hag en doa ranket bevañ ur pennad en harlu, a lavar deomp pegen c'hwerv e kave bara an dud all ha pegen garv an hent pa ranke pignat ha diskenn dre zerezioù an nesañ. Pa rankomp amprestañ dilhad un all ne vez ket kalz a lorc'h ennomp. Hag e vefe lorc'h ennomp pa rankomp amprestañ dilhad gall da wiskañ ar pezh hon eus da lavarout d'hor c'henvroiz ? Mammoù Breizh, klevit mat, deoc'h-c'hwi eo da vezañ mammoù ho pugale, mes deoc'h-c'hwi eo ivez bezañ mammoù ho pro. Poaniañ a zleit da gas ho tiegezh en-dro, met poaniañ a zleit kement-all da virout ouzh ho pro da gouezhañ en he foull ; ha kouezhañ a raio koulskoude ma varv ar brezhoneg ; Doue ra viro ! Ma varvfe ar brezhoneg e genoù



bugale Vreizh, e vefe un eostig nebeutoc'h er bed-mañ o kanañ meuleudi an Aotrou Doue, ur steredenn nebeutoc'h war an hent a gas da Rom, ur rivin e vefe evit ar vro-mañ, zoken evit ar pezh a sell ouzh an deskadurezh, rak ar brezhoneg desket-mat gant ar c'hrouadur e-tal e vamm, e-pad c'hwec'h pe seizh vloaz, eo alc'houez an holl yezhoù all. Evit kennerzhiñ va c'homzoù, e lavar in deoc'h e oa, warlene, daou Vreizhad yaouank oc'h echuiñ o studi e skolaj Lezneve n. Unan a oa genidik a Winevez, egile a Blouider. Betek o seizh vloaz n'o doa komzet nemet brezhoneg. En desped da se, ha, marteze, abalamour da se, o deus bet ar prizioù kentañ e-pad seizh vloaz e latin, e gregach, hag o deus bet o-daou hepken, an daou briz a enor evit ar galleg. O-daou emaint hiziv er C'hloerdi, o studiañ skiantoù Doue.

Nann, ar brezhoneg ne ra droug ebet d'an deskadurezh. Va-unan em eus graet skol da verc'hedigoù e-pad tri bloaz. Evit deskiñ galleg e komzen dezho e brezhoneg, ha m'henn asur deoc'h, ar gerioù desket evel-se a chome skrivet mat en o fenn.

Ar c'hilheion-raden, eme Dolstoï, p'o devez c'hoant da dreuziñ ur stêr, en em gemer evel-henn : ar re anezho a vez en a-raok, en em daol war o fenn en dour, a-vil-vern, ken na zeu o c'horfoù-marv da ober ur pont d'ar re all da dremen. Ret e vo ivez da veur a Vreizhadez en em reiñ evit saveteiñ ar brezhoneg. En ur ober al labour-se e hadimp al levenez en hon tiegezhioù, e kasimp sonioù lirzhin a-dreuz hor maezioùhag hor pedenoù breizhat betek ar baradoz.

Mari an Duff

\*\*\*\*\*

**Notenn**

Azonus eo ar pennad-mañ eus ar seurt arguzerezh, diwar-c'horre evit gwir, a veze implijet gant emsav ar yezh e-touez ar vrezhonegerion eus ar bobl evit gounit warno mirout ha treuzkas ar yezh. Tro pe dro

e c'hell bezañ bet efedus evelkent, en ur metou plouezat en e aez eus Leon, e-pad ur rummad bennak. Awenet e oa dreist-holl gant kelaouenn Y.V. Perrot "Feiz ha Breiz".

\* Maria Abgrall a oa ur skrivagnerez eus ar bobl, moarvat.

& \_ & \_ & \_ & \_ & \_ & \_ & \_ & \_ & \_

Notennoù a bep seurt

gant Herve Lanndiern

"Gwerz Yann-Vari Perrot"

N'eus ket kalz en emsav a oar pelec'h e voe embannet ar werz-mañ goude ar brezel. Mat, dont a reas er-maez war ar gazetenn etrekeltiek "An Aimsir Ceilteach" a oa istitlet "The Celtic Time, monthly paper of the celtic Peoples. The organ of information within the celtic peoples and abroad; the instrument of interceltic and cooperation". Skridaozet e oa ar gelaouenn-se e saozneg hag er yezhoù keltiek ha moulet e voe e stumm ur gazetenn a vent vras. E gwirionez, daoust ma ne zeue er-maez, en un doare mui pe vui reoliek, nemet bep miz, e felle d'ar re o doa diazezet ar gelaouenn-mañ ober anezhi ur seurt "Heure Bretonne" evel m'henn diskouez an talbenn e-unan : "An Aimsir Ceilteach".

Un toullad pennadoù a voe embannet e brezhoneg er gazetenn-se. Unan eus ar pennadoù-se a voe moulet e-barzh niverenn Nedeleg 1948, war ar bajenn gentañ, dindan an talbenn e saozneg : "The Murder of F. Perrot", evit deren mouladur ur werz bet dastumet e Kamp Marc'harid e Roazhon e miz Kerzu 1944, hag a oa da vezañ kanet war don "Ar Re C'hlas" :

Setu adarre kourmoul du  
O'n em ledañ war ar vro,  
Tan ha muntr dre-holl a bep tu.  
Ar bleizi 'zo deuet en-dro,  
Met gant skoazell meur hon Aotro',  
Bretoned, ez adsavot.  
Pedomp neuze Tadoù ar Vro,  
Ha Sant Yann-Vari Perrot !

Harzet e vez 'bern Bretoned,  
Bugale ha maouezed  
'Blamour ma komzont brezhoneg

A reont foi war ar galleg,  
 Gant ho yezh 'vat 'reot bepred.  
 Rak atav e lavarot :  
 "Hep brezhoneg n'eus Breizh ebet"  
 'Vel Sant Yann-Vari Perrot.

Harzet eo bet hor beleion,  
 Er c'hampoù ganimp lakaet  
 Da c'houzañv ar riv hag ar marv  
 A-dreñv an orjal dreinek.  
 Dalc'het 'vo soñj eus hor poanioù.  
 Marteze 'troio ar rod !  
 O c'hinnig 'raimp 'vel aberzhoù  
 Da Sant Yann-Vari Perrot.

Ur soñj d'hor breudeur bet,  
 D'ar re. 'zo c'hoazh karc'harriet :  
 karantez Vreizh 'zo o zorfed !  
 'Viti int bet merzheriet.  
 Dalc'hit o soñj en ho kalon,  
 Bretoned, keit ha ma vevot,  
 E roll hir hon holl Verzherion  
 'Vel Sant Yann-Vari Perrot.

Evel ma verken, moulet eo bet "Gwerz Yann-Vari Perrot" war an "Aimsir Ceilteach", e Corcaigh, e 1948. Met e gwirionez e oa bet embannet ar skrid-se seulabred war follennoù liesskrivet ha skignet dindan an talbenn "Hor Bro" a-berzh ur strollad 'dirgel' a zo meneget o-daou war an "Aimsir Ceilteach" evel orin an destenn : "E.A.V." "Hor Bro" "12-12-44". 'E.A.V., a gav din a zo "Emglev ar Vrezhonegerion" hag "Hor Bro", a veze embannet eus e berzh e 1944-1946, a oa aozet e gwirionez gant Alan Louarn, hervez kemennadurioù Rôparz Hemon, en doa klasket embann "Arvor" er stumm-se e-pad miz Gouere 1944, da vihanañ. Follennoù "Hor Bro", a gemere lec'h an "Arvor" dirgel, a veze dornskrivet gant paper-glaou, pe skoet war ur c'hozh skriverez kentidik (a denne koulskoude un tammig d'ar skrivereziou dre voutloù a voe implijet un nebeut bloavezhioù 'zo).

Evel ma verken, gant Alan Louarn e veze aozet pep tra.

Evit pezh a zo eus "Gwerz Yann-Vari Perrot", savet e voe 'a-stroll', moarvat, gant prizonidi ar "C'hamp Marc'harid" e Roazhon, da geñver kentañ deiz-ha-bloaz drouklazhidigezh ar beleg brogarour, d'an 12 a viz Kerzu 1944 ; bezet pe vezet, gant emsaverion eo e voe savet, ha me 'laka e oa Alan Louarn unan eus ar re-se.

Mat e vefe ober istor an embannadurioù 'dirgel' a-berzh an emsaverion e bloavezhioù ar goudevezh-brezel diwezhañ. Piv en deus un dastumad klok eus "Hor Bro", da skouer ? Evit "An Aimsir Celteach", hep bezañ dirgel a-grenn, ne oa ket kennebeut kantroel na foran penn-da-benn, ha n'ouzon ket ha kalz a vrogarourion a voe koumanantet dezhi e Breizh, na zoken, ha tu a oa da goumanantiñ ; marteze e oa anezho en Iwerzhon hag er broioù keltiek all. Ne gav ket din e teuas er-maez en un doare reoliek biskoazh, ha n'ouzon ket kennebeut gant piv ez eus un dastumad klok anezhi. Un dastumad diglok anezhi am eus, etre miz Meurzh 1948 ha Gweingolo-Here 1951. Anaoudek e vefen ouzh kement hini a c'hellfe klokaat va dastumadenn ; ar re o defe titouroù a c'hell skrivañ d'ar gelaouenn-mañ.

Herve Lanndiern

(-)(-)(-)(-)(-)(-)

Herve Le Boterff.- La Bretagne sous le gouvernement de Vichy.- Paris, Editions France-Empire, 1983.

Goude maz eus bet embannet flemmskridoù mennet da dremen da oberennoù istorel, setu labour un istorour gwirion, o reiñ un daolenn sklaer-kenañ, frammet-start, dielloù e-leizh ennañ, diembann pe zisoñjet, diwar-benn ur marevezh maz eus arvell e-leizh en e sigur, ha n'eo ket mouget c'hoazh, pell emañ, an droukrañs hag ar gasoni a oa diwanet diwarnañ.

Ur marevezh tu-pe-du eo ar marevezh-se evit Breizh.

Goude bezañ tizhet hogozik an dishualded, e vo daskoret hor bro da staelveliezh gouarnamant Vichi, unan eus ar muiañ gwaskus, divarrek, tarvelour e-touez an holl staelveliezhoù o deus graet o reuz er riez c'hall a-hed hec'h istor, hag a zo o vont da genurzhañ ur seurt preizh-ataerezh - azas eo ar ger, - war dachenn an armerzh e Breizh, dreist-holl avat hini an dastum-boued, en ur "rannbarzh pinvidik"; ken gwir eo se maz eo al lodennoù-boued aotreet d'ar genderc'herion vreizhat aliesdisteroc'h eget ar re a veze aotreet da annezidi rannbarzhioù all ar C'hwec'hkogn. A-hend-all e oa gwalleget a-grenn an aveerezh en hor bro war wall an amaezhieriezh vichiat-se; ken gwalleget all e vo hor bro war dachenn an adeiladadsaverezh, pa oa bet gwastet he forzhioù hag he c'hêrioù da heul emgannoù deroù-hañv 1940 ha bombezadegoù ar Saoz-Amerikaned er bloavezhioù war-lerc'h. War ar marc'had, evit seizañ ar vro-mañ da vat ha dilemel diganti pep chañs da ad'chenel, ez eo bet skrapet digant Breizh, e miz Mezheven 1941, he c'hêrbenn istorel hag armerzhel, kêr An Naoned. Bez' e vo bet enor an emsav hag e wask, an hini taer koulz hag an hini didaer, bezañ bet, o-unan-penn er pleustr, o tiskuliañ ar gwallarveroù-se, deiz goude deiz, ken e voe distignet ganto e Breizh ur stourmadeg-enebiñ, hag a dizho rediañ gouarnamant Vichi da arallsturiañ tamm pe damm e leviadurezh.

Pobl Vreizh, war-lerc'h distokadenn 1940, a emouez goustadik en-dro ouzh he fersonelezh; dinodiñ a ra ur c'hedveno breizhat gwirion, ha dirak nerzh ar vroadelouriezh vrezhon o kreskiñ, en em gav rediet ar gouarnamant gall da zilezel darn eus e zarvennadurioù, ken e par kelennerezh ar yezh, ken e par hini an Istor.

Arabat eo en em douellañ; ar gouarnamant gall ne lezo da vont digantañ nemet bruzun a vez taolet dindan an daol.

Goude ma voe aet kuit Darlan ha ma voe erruet e Breizh ur Prefed douget muioc'h da gompren an traoù, al Lorenad Jean Quenette, ez aio ar saviad da vat war wellaat. Pa voe bet krouet "**Kengor-kuzuliañ Breizh**", a voe lusket war-raok nerzhus gant Yann Fouere; hemañ

a glasko ober eus ar C'hengor-se ur gwir vodadeg rannvro, o ledanaat bepred he c'hembeli, ken na vo ket dister he levezon, ma vo lakaet e dalch ar vro, evit ur pennad-amzer, ur benvegad-derc'houezañ, seurt n'en doa bet biskoazh abaoe 1789, met preveudi an nevez-amzer-se a vo dise-c'het-krenn da heul reverzhi dreistjakobinat ar goudevezh-brezel, goude ma voe erruet ar Re Unanet.

Petra 'vefe deuet an ensavadur-se da vezañ kenkas m'en dije peurbadet renad ar Marichal Pétain? Den ne c'hell gouzout. War ar poent-se n'omp ket a-du gant an aozer tamm ebet, ha disheñvel-krenn eo hor barn diouzh e hini.

Darbenn a c'heller ez eo bet Pétain ur politiker ampart er par etrevroadel, hag en deus kenoberiet e Montoire, evit un tamm mat, da drec'h ar Re Unanet, dre virout ouzh Hitler a c'houzerc'hel Norzhafrika ma vo tonkus an dalc'hidigezh anezhi evit dibenn an eil brezel-bed; roet en deus an tu d'ar Re Unanet da c'hounit amzer dre e leviadurezh-daleañ; war un dro en deus tapet digant an Alamaned derc'hel unded ha kenglenegezh ar Stad c'hall. Diaes eo nac'hañ ar c'hontrol.

Padal, en desped d'ar pezh a seblant krediñ an aozer 'ta, ez on sur a-grenn e chome Pétain ur Jakobin dibened e-unan, daoust d'ar frazennadurezh nevez implijet gantañ. E falsrannvroelouriezh ne zisoc'he - evel maz eo evezhiet gant H. Le Boterff e-unan, - nemet war gadarnadur ar galloud stadel. Ha ne gredan ket kennebeut en e "broviñselouriezh", en e youl wirion da adsevel "rannvroioù istorel" Bro-C'hall.

Petra soñjal eus e "gilsoñjerezh", prest ha ma veze bepred da vratellat an eil pe egile, evel ma c'hoarvezas da "zevezh ar re vratellet" end-eeun, d'an 29 a viz Mezheven 1941, p'en devoa prometet war un dro da vaered Roazhon ha Naoned e vije o c'hêrioù ketep kêrbenn ur rannvro a Vreizh adsavet en hec'h anterinded istorel, hag eñ oc'h embann antronoz, d'an 30 a viz Mezheven, e oa disrannet al Liger-Atlantel diouzh Breizh ha staget ouzh Añje. Diaes eo goude-se krediñ en onestiz spered an hini a oa neuze e penn ar Stad c'hall.

E gwirionez, en abadenn c'hoari kartoù 'poker' etre Alamagn ha Bro-C'hall e klaske pep c'hoarier truchañ ar muiañ ma c'helle. Hogen en o darempredoù gant Vichi ne glaske ket renerion an emsav touellañ o c'hendivizion, Remont Delaporte koulz ha Roparz Hemon peurgent. Ne oa ket eus ar vrogarourion-mañ stourmerion trelatet, 'pennpellavourion' e doare ebet. Tud kerreizh e oant, dezho skiant ar pezh a zo gallus hag ar pezh n'eo ket ; dleout a rajent bezañ bet "kendivizion dalvouddek" evit gouarnamant Vichi ; hemañ a zleje bezañ boulc'het ganto ur vreatadenn emsavus, ma vije bet mennet e gwirionez da glask un diskoulm da gudenn Vreizh.

Moarvat en deus levierzh Vichi deroet un toullad aotreadennoù d'an emsav en eil prantad e redad, hogen n'en deus ket graet diwar ur sellboent politikel nevez a zleje bezañ e zegaset da adveizañ an darempredoù etre ar Stad hag ar gevredigezh ; diwar ur redi politikel en deus graet se, dre ma ranke, en desped dezhañ, derc'hel kont eus nerzh an emsav e Breizh : setu holl.

Forzh penaos, ret eo anzav e oa diaes empennañ an emziviz etre an emsav ha gouarnamant Vichi evel un emziviz kloz etre daou gengomzer nemeto. Bez' e oa un 'trede den', ar galloud alaman. Kenkas e vije bet peurdrec'h hemañ e dibenn ar c'henstok a oa o vont en-dro, e c'heller en em c'houlenn ha dilezet en dije ar mennad en doa, moarvat, da ober eus Breizh ur seurt "Suomi" kornogel, kantenn-dreiñ armerzhel ha milourel kuzh-heol Europa, hag e gi-porzhañ war ar marc'had ! Moarvat e klaske an Alamaned tennañ un tamm gounid evit ur pennad amzer eus o darempredoù mat gant Vichi ; met daoust hag hemañ a c'helle kontañ war ar "ger" roet gant an Alamaned, gant Hitler peurgent, hemañ ur c'henderv kompez da Loeiz XI ar C'hallaoued, en devoa ivez meur a c'her da eskemm an eil war-lerc'h egile e deun e chakod, e-giz ur sigoter. E gwirionez, pep hini a glaske livañ gevier ha touellañ egile.

Herve LANNDIERN

## Bloavezh Santel an Dasprenidigezh 1983-1984

Petra eo an dasprenadurezh ?

gant Maoris ar C'hollo

Zake a zo ur skouer eus an doare ma tleomp reiñ degemer d'Hor Salver. "E zegemer a reas gant levenez," eme an Aviel. E-ser degemer Jezuz en deus degemeret ar Silvidigezh pe an Dasprenadurezh. "Hiziv," eme Jezuz, "eo deuet ar silvidigezh en ti-mañ." Ar bloavezh santel-mañ, - war an echu bremañ, - a zo bet divizet da geñver 1950vet deiz-ha-bloaz Dasprenidigezh an dud. Tro a ro deomp da verkañ hor meuleudi ha da rentañ bennozh da Zoue, gant muioc'h a don eget boaz, en abeg d'hon dasprenidigezh. Met ne dalvezo ket ar Jubile da galz a dra deomp hon-unan, ma ne zeuomp ket, da gentañ, da vevañ en un doare gwiroc'h evel tud dasprenet. En abeg da se em eus soñjet e vefe mat deomp, a-gevret, goulenn ouzhimp hon-unan petra eo bezañ dasprenet, petra a lakaomp dindan ar ger "dasprenadurezh". Ra blijjo gant an Itron Varia, m'emaomp war he douar e Rumengol, bezañ ganeomp evit hon hentañ, hervez maz eo Mamm an Iliz ha Mamm pep hini ac'hanomp.

Petra eo an Dasprenadurezh ?

Bez' e c'heller respont gant ar gerioù-mañ : an dasprenadurezh a zo un oberenn kaset da benn gant Doue, dre Jezuz-Krist, e Vab, e-keñver gouenn an dud. Ha sant Paol, en e "Lizher da Ditos" a lavar peseurt oberenn eo hounnezh : "Jezuz-Krist," emezañ, "en deus en em roet evidomp, evit hon dasprenañ eus pep drougiezh." (Tit 2/4). Pep tra a zo sanailhet er gomzenn-mañ. Met ned aio ket gwall zon en hor spered, ma ne gemeromp ket an amzer da vuzuliañ ar pouez anezhi.

Loc'hañ diwar an diazez

Ne c'hell ket an traoù bezañ sklaer, ma ne loc'homp



ket diwar an diazez, a vo kavet ganeomp e-barzh ar respont d'ar goulenn-mañ : "War be du en deus Doue c'hoant da gas an dud ?" C'hoant Doue eo degas an dud, gant o asant, betek ennañ e-unan, evit bevañ gantañ e-unan, tal-ouzh-tal, a-hed ar beurbadelezh. Evit se, e fell dezhañ ober anezho mibion dezhañ. Doue n'eo ket chomet prenet warnañ e-unan, o vevañ a-holl-visko-azh e kumuniezh an Tad, hag e Vab, hag ar Spered o tont eus an eil hag egile. Doue en deus, koulz lavaret, en em zigoret, en em lakaet degemerus. N'eus muzul ebet d'ar pennad-hent a zo etrezomp ha Doue, ha n'eus netra hag a c'helljemp ober evit dont da vezañ bugale dezhañ. Met maz omp-ni dic'halloud a-grenn, Doue n'eus netra ouzhpenn dezhañ, nemet unan hepken : tremen hep hon asant. E c'hoant ne c'hell mont da benn, nemet war-bouez maz asanto an dud dont da vezañ damheñvel outañ, kement ha ma c'hell tud tennañ da Zoue, evel bugale d'o Zad. Kentañ tra a rank an dud eta ober, evit se, eo en em zigeriñ, war skouer Doue, en em lakaat degemerus eveltañ ; degemerus e-keñver Doue, degemerus e-keñver ar pezh a c'hoanta evidomp ha diganeomp ; degemerus ivez e-keñver an dud all hag a zo, evelomp hon-unan, degemeret gant Doue ha kinniget deomp gantañ evel breudeur. Kement-mañ a lavar deomp : "Setu m'emaon stok ouzh an nor ha ma skoan ; maz eus unan bennak o klevout va mouezh hag o tigeriñ din an nor, ez antrein d'e gaout hag e koagnin gantañ, hag eñ ganin." (Disk 3/20)

#### An dud a oa da zasprenañ

Penaos edo kont gant an dud, pa voe kaset en o zouez gant Doue e Vab e-unan ? Hervez kelennadurezh an Iliz, ne chomas ket an dud kentañ degemerus e-keñver Doue. Serrañ a rejont an nor warno o-unan, ha stankañ an nor dirazo o-unan da vont etrezek Doue. War o lerc'h, an dud, an eil war-lerc'h egile, a zeu war an douar douget da zisteurel Doue, dic'halloud da vezañ degemerus en e geñver ha degemerus eveltañ, dic'halloud drezo o-unan,

da erruout biken betek ennañ. En ur ger : n'int ket gouest da zigeriñ o dor ledan a-walc'h, na da virout dalc'hmat an nor-se digor, e doare ma c'hellfe Doue ober anezho ar vugale dezhañ e-unan en deus c'hoant zegas en e gichen.

Petra a lakaan a-dreñv d'ar skeudenn-se : an den o terc'hel serr e zor ouzh Doue ? Ur seurt den a ziviz ren e vuhez penn-da-benn ha klask e evurusted evel p'en dije ar gwir da da zibab kement tra a gav diouzh e zoare. En em lakaat a ra perc'henn penn-da-benn dezhañ e-unan, ha douget eo da lakaat en e servij an dud all, ha Doue zoken. En em lakaat a ra da greizenn ar bed, evel pa vije gouest d'en em grouiñ e-unan. Setu gwizienn an holl bec'hedoù a c'hell ober, - ma c'hellomp lavarout kement-mañ, diouzh ar pezh a skrive sant Paol d'ar Gorintidi : "Evit an holl," emezañ, "eo marvet Jezuz-Krist, evit na vo mui ar re vev o vevañ evito o-unan, met evit an Hini a zo, evito, marvet hag adsavet da vev." (II Kor 5/15).

Sant Paol eo ivez an hini a lavar deomp ez eo buhez ar pec'her ur sklavelezh : "E Jezuz-Krist hon eus, dre e wad, an daspren eus hor sklavelezh, ar pardon eus hor pec'hedoù." (Ef 1/7). Ha Jezuz-Krist e-unan a lavar deomp ez eo ur gollidigezh ur gwalleur hep distro.

Setu planedenn an holl dud gwitibunan, anez Jezuz-Krist hon Dasprener. Ret eo bet d'an dud gortoz ma teufe, a-benn dezho gouzout pegen strizh eo an ezhomm o deus a zasprenidigezh. Diouzh an doare maz eo bet houmañ sevenet, ha diouzh ar pezh a zo c'hoarvezet abaoe, e welomp pegen diaes eo d'an den pec'her digeriñ e zor da Zoue ha d'an dud all. Gwelout a reomp n'en deus Jezuz-Krist graet netra a re : rak gwelout a reomp pegen prenet e c'hell an dud chom warno o-unan !

#### Dasprenañ : petra eo ?

Dasprenañ, petra eo ? Ar re a veze dasprenet, gwechall, a oa an dud o deveze kollet o frankiz er brezel hag a veze kouezhet er sklavelezh. Adkavout a raent o frankiz, pa veze roet, evit se, arc'hant d'an enebourion o

dalc'he. Emaomp o paouez gwelout eus peseurt sklavelezh ez omp bet dasprenet gant Jezuz-Krist ha peseurt frankiz a zo kinniget deomp.

#### Digant piv ez omp dasprenet ?

Digant piv ez omp bet dasprenet ? Digant piv 'ta, nemet diganeomp hon-unan ? Jezuz-Krist a gavas an dud laeret digant Doue ganto o-unan ! An dud n'eus ket anezho hep Doue. Da Zoue hag evit Doue ez eus anezho, ha ne c'hellont ket en em ziframmañ, en em laerezh a-dre e zaouarn, hep mont da goll !

Met, ma fell d'an dud mirout pep galloud warno o-unan, chom dizalc'h a-grenn e-keñver Doue hag an dud all, petra 'raio Doue ? Ned aio ket dre heg ouzh an dud ; ne glasko ket lemel digant an dud ar galloud d'ober o dibab. Ar pezh a raio eo lakaat en implij e c'halloud divent a Zoue evit ma vo douget an dud d'ober an dibab a lezo kabestr gantañ d'o degas davetañ.

#### Petra a zo ret a-benn bezañ dasprenet ?

Ret eo teurel evezh ouzh kement-mañ : a-benn gallout lavarout ez eo dasprenet an dud e ranker gwelout ez int deuet gouest d'en em ziberchennañ diouto o-unan, hervez m'hon eus klevet gant sant Paol, ha da vezañ perc'hennetgant Jezuz-Krist.

#### Oberenn Doue, dre Jezuz-Krist

Gant ar soñj-se en o spered e komprenint aesoc'h perak ez eo gant gwad Jezuz-Krist ez int dasprenet. Doue an Tad eo a voulc'h an Dasprenadurezh. Mont a ra ar pellañ maz eus tu dezhañ, evit prouñ ez eo degemerus en hor c'heñver. Merkañ a ra ar youl en deus d'ober ac'hanomp e vibijon dre ober eus e Vab e-unan ur Breur deomp, a-raok zoken ma vijemp breudeur dezhañ. Reiñ a ra ar Mab-se hollgaret, e doare m'emañ da viken boutin etrezañ ha ni. En em ziberchennañ a ra, kement ha maz eus tu, eus e Vab e-unan !

Doue ar Mab a verk ez eo degemerus en hor c'heñver, peogwir ez asant en em ziberchennañ, kement ha maz eus tu, eus e renk a Vab-Doue, evit kemer, e-touez an dud, ur renk ordinal da welout, e-touez an dud pec'herrion, hag Eñ dibec'h ! Asantiñ a ra ren penn-da-benn ur vuhez-den paour ha strizh, o plegañ da gement den ha da gement tra a bennask hag a wask an dud.

Ha dreist-holl, ma chom, hervez maz eo Doue, par d'e Dad a-grenn, e teu da soublañ, hervez maz eo den, da youl e Dad e pep tra, hag e tiskouez evel-se d'an dud penaos bezañ degemerus e-keñver Doue, evel bugale e-keñver o Zad.

A-raok kas da benn o dasprenidigezh e oa ret dezhañ deskiñ dezho ar pezh na c'hellent ket gouzout heptañ : penaos bevañ evel tud dasprenet, evel bugale da Zoue ha breudeur an eil d'egile.

#### Perak en deus Jezuz skuilhet e wad ?

Met n'oa ket c'hoazh a-walc'h. Ret e oa dezhañ reiñ e vuhez dre skuilhañ e Wad. Perak ? Kement den a zo, nemet klañv e vije e spered, a zo prest diouzh ret, da c'houzañv n'eus forzh petra, da vezañ diberc'hennet diouzh pep tra, evit ma chomo gantañ e vuhez. Met n'eo ket prest da zigeriñ penn-da-benn dor e vuhez da Zoue ha d'e nesañ, ha ne fell ket dezhañ krediñ ez a war-du ar gollidigezh a chom prenet warnañ e-unan.

Evit reiñ d'an dud ar brouenn-mañ, en deus divizet Jezuz-krist, a-unan gant e Dad, eus e benn e-unan, en em lezel da vezañ diberc'hennet diouzh ar pezh a chomfe gantañ war-lerc'h skuilhañ e Wad : e vuhez a zen.

En doare-se, Eñ an hini kentañ eus an dud, en deus torret sklavelezh ar pec'hed, hag a zegas war e lerc'h ar marv. Ha dreist-holl, en doare-se en deus prenet digant Doue pep galloud evit kas an dud war-du un trec'h klok war sklavelezh ar Pec'hed.

#### Kelouñ meur an dasprenidigezh

Koulskoude n'eo ket echu c'hoazh ! Ret e oa d'an

dud gouzout e oa Mab-Doue e-unan an Hini en doa "en em roet evito, a-benn o dasprenañ eus pep drougiezh!" Ret e oa gouzout penaos, dre en em lakaat degemerus penn-da-benn e-keñver e Dad hag e-keñver an dud, en doa digoret d'ar re-mañ eienenn diheskus ur vuhez peurfonnus. Ha setu perak ez eo dasorc'het, gant e renk a Hini kentañ eus gouenn an dud nevez. Netra, hiviziken, a-berzh Doue, ne ra diouer, a-benn ma c'hallfe an dud asantiñ bezañ degemerus en e geñver hag e-keñver o breudeur.

**An dasprenadurezh lakaet da dalvezout**

Daoust da se e welomp bemdez pegen diaes e chom reiñ an asant-se. Hag ur wech roet, emañ e riskl da bep mare da vezañ dislavaret ganeomp, betek zoken ma teuomp zoken da brennañ en-dro warnomp hon-unan. Doue an Tad ha Jezuz-Krist a oar kement-se. Setu perak o deus degaset ennomp ar Spered Santel; setu perak o deus krouet an Iliz, e-lec'h ma c'hellomp en em skoazellañ kenetrezomp evit ren buhez ar vugale da Zoue ez omp deuet da vezañ. Renet e-barzh an Iliz gant ar Spered Santel, e c'hellomp "daskemmañ", da lavarout eo, cheñch stumm deomp hon-unan ha d'hon doare-bevañ, ha dont da vezañ tamm-ha-tamm ha mui-ouzh-mui ar vibion evurus a fell da Zoue kaout dirazañ. Kement am eus lavaret a c'hellje bezañ harpet war gomzennoù ar Skritur Sakr.

-----

**Mari hag hon dasprenadurezh**

**gant Youenn Troal**

"E-kichen kroaz Jezuz edo e vamm..." (Yn 19/25)

Anat eo ez eo bet bepred Mari e-kichen he Mab. Bepred eo bet, sioul, unanet buhez Mari gant buhez he Mab. Hag erfin, al liamm-se, ul liamm padus ha don, en deus he c'haset ouzh troad ar Groaz. Stok e oa ouzh he Mab d'ar mare ma oa oc'h en em reiñ, oc'h en em ginnig,

d'ar mare ma oa oc'h en em reiñ, oc'h en em ginnig, evit ma vefe santelaet an holl dud (Yn 17/19), evit ma vefent holl, a-unan, e-barzh he Mab. Dalc'hmat eo bet-hi e ser he Mab, rak klevet he doa an Aeled o kanañ a-us d'ar c'hraou: "Klod da Zoue!" Ar Werc'hez a ouie, adal an deroù, e oa deuet he Mab war an douar evit klod Doue. Ne oar ket c'hoazh ar soñj a oa gant ar Beleg-meur maz eo Jezuz, kerkent ha maz eus bet anezhañ e-barzh he c'horf-hi: "Setu perak ar C'hrist o tont er bed a gomz evel-henn: Nag aberzh, na profadenn n'o deus plijet dit; n'ac'h eus kavet mat na kevanloskoù nag aberzhoù evit ar pec'hed; neuze em eus lavaret: setu ma teuan... evit ober da youl, o Doue!" (Heb 10/5-7)

Gouzout a ra-hi ez eo deuet he Mab da reiñ brud d'ar gwir Doue. Ha kompren a raio, tamm-ha-tamm, ez eo soñj an Uheldreist a-holl-viskoazh, bodañ kement a zo er C'hrist, evit ma vefe meulet e anv gant pep den hag evit pep tra. Pa darzh ar "Magnificat" eus kreiz he c'halon, e teu he levenez, hec'h evurusted dezhi, dre maz eo sevenet, erziwezh, an Dasprenadurezh hollvedel. Leun eo he c'halon a zudi o vezañ maz eo deuet d'ar bed he Dasprener, dre ma oa-hi e tu, hi, ur vaouez, bet galvet e pep frankiz, da lavarout 'ya' pe 'nann'. Santout a ra dreist-holl ez eo-hi dasprenet. Dasprenet eo bet en un doare kevrinus adal ar penn-kentañ eus he buhez. Santout a ra ez eo karet, karet hep dellid ebet eus he ferzh. Leun-barr ez eo gant Doue: enni emañ al levenez kristen, levenez ar Silvidigezh. N'eus enni netra ha na zeufe ket eus Jezuz. Da gentañ ez eo bet dasprenet, ha dasprenet eo bet muioc'h eget nikun, rak glanaet eo bet betek ar wrizienn anezhi; glanaet, santelaet, muioc'h ha gwelloc'h, evit kemer perzh a-dostoc'h e buhez an Dreinded.

Ha Mari a oar, abaoe ar penn-kentañ, e vo garv an abadenn. Pa ginnigo he Mab en Templ e lavaro dezhi ar c'hozhiad Simeon: "Treuzdidreuzet e vo dit da galon gant ur c'hleze..." Setu perak ez asant Mari da bep tra. E Nazared e tistag he 'ya' d'an ael. "War ar C'halvar ez adlavaro ar 'ya'-se: "Ya, kinnig a ran, aberzhiñ a

ran, reiñ a ran va Mab evit salviñ ar Bed." War ar C'halvar, "eme Vaticano II, "ez asant Mari, dre he c'harantez, e vefe aberzhet an hini a zo bet ganet ganti. He c'halon a vamm a oa a-unan-krenn gant he Mab oc'h en em ginnig. Kinnig a ra he Mab d'an Tad, hi hag a oa dinamm penn-da-benn, evel un Eva nevez, evit holl vugale Adam nammet abaoe ar penn-kentañ.

En he sav emañ-hi ouzh aoter ar Bed, ar C'halvar, evit profañ he Mab, "unanet gantañ dre he feiz, he goanag hag he c'harantez..." (Reun Laurentin). N'eo ket chomet da sellout ouzh he Mab : kemeret he deus perzh ; sammet he deus warni kinnig he Mab ; aet eo e-barzh e sentidigezh hag e fiziañs e-keñver e Dad. Oc'h en em reiñ d'he Mab e teu E breder da vezañ he freder dezhi : adober eus an dud bugale, mibion da Zoue.

"E-kichen Kroaz Jezuz edo e vamm." Anat-kaer eo ez eo Santez Mari ur vaouez veur, dre he nerzh-kalon. Rak e-harz ar groaz edo. Ha kalonek e oa bet endeo p'he devoa degemeret genel an Hini a salv. En em unaniñ krenn a ra gant poanioù an Dasprener. He foanioù, moarvat, ne oant ket ret evit hon dasprenadurezh. Ha koulskoude, e-barzh steuñvoù kozh an Aotroù Doue ez a he gouzañvidigezh da heul hini he Mab. Perak ? N'emañ ket roet deomp ar respont. "Hi," eme sant Alberzh ar Meur, "a oa da heul Jezuz o salviñ." "Hi," a skriv Pius XII, "a oa he c'halon hael o reiñ skoaz d'an Dasprener doueel."

Kalon c'hredus ar Werc'hez a ouie e oa ret-holl marv kriz ha feuls he Mab. Ken bras ha ken kreñv ez eo Pec'hed ar Bed ! Gwelloc'h he dije kavet avat e vije tremenet e-biou dezhi ar c'haliriad, - evel ar C'hrist e-unan. Asantiñ a ra evelato e vefe tennet diganti ar Mab bet roet dezhi. En he c'hinnig ne zalc'h netra ganti. Ha setu perak, p'edont o-daou unanet-rik e barr ar boan eo en deus Jezuz he diskleriet, a-c'houez d'an holl, Mamm ar re holl a zegemer he Mab evel o Dasprener. Diskleriet eo Mamm an Iliz. Er gwashañ glac'har ha gwaskerezh e teu Mamm Doue da vezañ Mamm an dud, karet ganti evel maz int karet gant he Mab. Rak pa varv Hor Salver e red ar Vuhez war ar re holl a gred ennañ. Hogen Mari

a zo, evit ul lodenn, pennabeg eus ar Vuhez nevez-se. Ar gwad a ziver war goad ar Groaz a zeu eus he gwazhied-hi. War ar C'halvar e c'han adarre ; war ar C'halvar e tiwan adarre ar Vuhez anezhi. Staget eo gant Jezuz ouzh Yann, hag o vezañ staget ouzh an abostol muiañ-karet, emañ staget ivez, e-giz mamm, ouzh an holl dud, ouzh an denelezh a-bezh.

Dasprenet omp bet "ur wech evit mat", salvet "ur wech evit mat". Evelato ez eo dav deomp, tud dieub maz eus ac'hanomp, - n'omp ket sklavourion, - degemer ar Silvidigezh, asantiñ d'ar Silvidigezh-se dre ar feiz ha dre gemer perzh e buhez an Iliz. Setu an abadenn hon eus da gas da benn. Setu hor c'hrogad speredel. N'em-aomp ket hon-unan ; harpet omp gant holl izili an Iliz, gant pedennoù hor breudeur er feiz. Skoazellet omp kalz muioc'h avat gant pedennoù ar Werc'hez Vari. Setu perak ne ra ket ar reizhkredenneion an hevelep goulenn ouzh an "Theotokos" ("Mamm-Doue") hag a reont ouzh ar Sent. Aspedet e vez ganto : "Mamm Doue, hor salvit ! Da lavarout eo : Mamm Doue, grit deomp, dre hoc'h erbederezh ouzh Hor Salver, dont da vezañ, dre hor buhez kristen, gwir vugale da Zoue, e-kreiz Iliz ho Mab !

E Rumengol, d'ar sul 26 a viz 1984,  
Bloavezh Santel 1983-1984

Youenn TROAL

& - & - & - & - & - & - & - & - & - &

Addispleg

An daou bennad hon eus moulet uheloc'h diwar-benn an dasprenadurezh a zo anezho kenteliadennoù bet distaget pellzo ; tennañ a reont o-div d'ar gelennadurezh eeun a veze roet ergentaou d'ar gristenion diwar-benn o feiz. Abaoe un toullad bloavezhioù avat o deus strivet kalz feizoniourion eus ar goudevezh-goursened diwezhañ, Gallaoued anezho dreist-holl, eveljust, da ziren ar griste-

niezh d'un dastumad rekiyeoù ha chemedenoù trivliadel-politikel awenet gant arroudennoù 'zo eus an Aviel, ha n'int mat, e gwirionez, nemet da zistanañ debron relijiel un dornadig marksourion a venn bepred ober kristenion anezho, en ur skarzhañ diouzh ar feiz kement a c'hellfe bezañ... relijiel enni end-eeun. Padal, kevrinoù ar feiz a chom e diazez ar gravez kristen, ha ne c'haller ket o hekoriñ hep tennañ pep ster ha pep kempoell diabarzh diouzh houmañ.

Kevrin an dasprenadurezh ne c'hall ket bezañ dispartiet diouzh hini an Dreinded, peogwir n'he deus an dasprenadurezh ur ster nemet diouzh maz eo Jezuz eil hiniad an Dreinded.

E gwirionez e c'haller stigmañ, e ser kevrinoù ar feiz, meur a gudenn, hag ober meur a c'houlenn.

Perak, da skouer, o deus divizet kentañ hag eil hiniad an Dreinded e teufe ar C'hrist da salviñ an denelezh dre c'houzañv e Basion ? Bez' e c'halle Doue salviñ houmañ dre un diviz gradus holldidel ; bez' e c'halle henn ober ivez o kas ar C'hrist evel ur Mesiaz glorius, seurt ma oa empennet gant ar Yuzevion o-unan.

Hogen, ouzhpenn he zalvoudegezh enbarzhek piaouel, e oa d'an dasprenadurezh un dalvoudegezh-kenteliañ ivez. Un torfed euzhus e oa bet ar Pec'hed, diouzh ma tenne hemañ da zistrujañ Doue evel Doue en ur dennañ arver eus ar bed krouet gantañ e-unan evit sevel ur bed nevez, estren ouzh krouer an hollved ; un arnod e oa anezhañ da sevel an Den e rez e Grouer, hag a-enep dezhañ ; un arnod enta, adarre, d'e zistrujañ evel Doue. Lavaromp diouzhtu ez eo bet nevez damkanekaet an emsaverezh-se a-enep da Zoue, ken kozh hag an denelezh, gant ar brederourion arnevez, a c'houlaka emañ enboudet ar Spered en denelezh hec'h-unan hepken.

Un dalvoudegezh arouezennus eus vilded ar Pec'hed, anezhañ ur seurt treisoni, ur seurt tadelhadenn, a oa d'ar Basion enta, a roe ur skouer, er c'hontrol, eus ar sentidigezh klok ouzh youl Doue war e grouadelezh.

Ne vern penaos, a-hend-all, ne c'halle an dud bezañ mazavet hep bezañ keuziet d'o fec'hed. Ha daoust ha gallet o dije bezañ keuziet hep bezañ merzet splann poanioù o Doue ?

Diouzh un tu all, ne oa ket ar Mesiaz evit bezañ perzhiek e klodoù ar bed-mañ, anez bezañ kemmesket, dres, gant n'eus forzh peseurt arloz, turant pe impalaer eus ar bed-mañ, ar seurt re o deus klasket a-holl-viskoazh en em dremen da Zoueed end-eeun. A-rez gant Herodez e vije bet ur Mesiaz glorius, goude ma vije bet anat e vadelezh a-hend-all. Setu 'ta eil kenteliegezh emzenadur ar C'hrist e stumm ar Servijer.

Ur c'hraf all hag a vefe da ensellout a zo hini an 'dasprenadurezh' end-eeun. Soñj a zo e lavarer en displegadenn gentañ ez eo bet dasprenet an den digantañ e-unan. An diogeladenn-mañ a zo gwir-tre, met a c'houlenn bezañ resizet. Dre ar Pec'hed, elese, dre ar youl en doa mab-den da grouiñ e ved e-unan, hep klask diverzout mennad Doue warnañ e-unan, e oa deuet mab-den da vezañ ur Boud distag diouzh e Grouer, prizoniad anezhañ e-unan ; troet e oa an Denelezh da vezañ ur seurt boud bev dishual, ma oa pep den un ezel anezhañ, kendonkad gantañ en un doare organek, koulz lavaret. Hogen arabat eo ankounac'haat ivez e oa kerentiet an Denelezh kouezhet ha dishualet-se d'an Droukspered e-unan, sujet da hemañ en un doare bennak : daoust hag an Diaoul ne oa ket bet an Tenter e deroù istor an Denelezh end-eeun ? Lavarout a c'hallfed e kave an Denelezh diwar neuze hec'h orin hag he fatrom en Droukspered e-unan ; Arloz an Denelezh kouezhet hag emsavet a-enep da Zoue ez eo an Droukspered, dezhañ, a-hend-all, un natur trec'h da hini an den, evel maz eo natur ar Mestr trec'h da hini an Diskibl, hini an tad da hini ar c'hrouadur h.a. Rak-se ivez ez eo mesket tud ha diaouled en hevelep daonedigezh. Ho pezet soñj ivez ez eo ster ar ger "diabolo" "tamaller", hag en em ziskouez hemañ dirak Doue evel ar Perc'henn o c'houlenn e ve restalet dezhañ an den evel ur mad dleet dezhañ. Rak-se e oa ar gredenn voutin e-touez ar gristenion, e oa bet dasprenet an dud digant an Droukspered. Ur ster resis-tre en deus ar ger "dasprenadurezh" enta.

Stag eo ivez keal an dasprenidigezh ouzh hini un denelezh nevez, kevanet ouzh ar C'hrist, sellet evel Penn ar C'horf Kevrinel. E framm un unded organek nevez,



damheñvel ouzh hini ur boud bev, ez eo salvet ar gristion sellet evel izili ur blantenn ("ar winienn" ez eo ar C'hrist). Amañ e c'heller dizoleiñ ivez un dave da geal "urzhaz ar Speredoù". Sujet eo ar speredoù an eil re d'ar re all, darn o vezañ patromoù, an doueed, -ar re all, end-eeun, ar sujidi, ha se a zo anat e rez ar c'hevredigezhioù naturel (kv. Aesc'hulos oc'h ober doueed eus ar rouaned, Homeros o reiñ d'ar re-se an anv a "Vesæ-rion ar Poblou"). Krouadur ebet ne c'hell hanvout drezañ e-unan. Dre se ne c'heller ket paouez a vezañ sklav an droukspered hep dont da vezañ sklav Doue, o tizhout ennañ hor gwir rezid, dre maz eo doueek hon orin hag hon natur. Gwelout a reer enta pegen pouezus eo keal an Iliz, evel Korf Kevrinel ar C'hrist annezet gant ar Spered Glan.

E gwirionez ne oa ket ezhomm eus nebeutoc'h eget ar C'hrist-Doue d'hor salviñ, hollc'halloudek maz eo e nerzh-dedennañ d'ar re a venn e zegemer evel Doue ha Salver end-eeun, evit o zennañ eus poull-tro an ifern ha nerzh-dedennañ un droukspered trec'h dezho e pep keñver, dre ma oa bet e henter war-du an emsaverzh a-enep da Zoue. Da bep den eo dibab e Aotrou, e framm e Iliz, hini an Aotrou Doue ("aotrou" o talvezout "mager", desaver") pe hini Arloz ar bed-mañ, an Droukspered. E bed ar Spered, evel e bed an Danvez, a zo ur skeudenn anezhañ, ez eus ivez un amgerc'hellegezh hollveziadel : hini Doue, digor en diventelezh, hag hini e Gevezer, serret en e boullou-du !

Evit echuiñ e karfemp dedennañ an evezh war zibarelezh ar relijion gristen e-touez ar relijionoù all, zoken an hini yuzev pe an hini vuslimat a zo kerentiet dezhi hag a geferataer alies outi. Er relijionoù-se ez eo meizet Doue evel krouer an hollved, arzoberour ur bed perc'hen-net gantañ evel ur glad, ha dezhañ ur vestroni diharz warnañ, an dud o vezañ darn eus ar glad-se. Er feiz kristen avat ez eo meizet Doue, da gentañ, evel un darempred a gengarantez enboudet, hag ar groudigezh evel eztaoladur an darempred-se. Doue ne c'hell peurgas da benn e oberenn nemet dre rezid e Vab hag hini ar Spered Glan, diveret eus darempred kentoc'h an Tad

hag ar Mab. Ret eo kounañ amañ aviel sant Yann, a ziskleir ez eo bet graet ar bed evit ar Mab.

Ar pezh a zo enta a-holl-viskoazh, en orin ar bed ha pep bout, ez eo un anien denel skouerel, triel, Gour, Benenn ha Krouadur, ur wech klevet ez eo an termenou-mañ damskeudennadurioù eus ur gwirvoud ha na c'haller tizhout nemet war-bouez 'hontmeizañ', dre analogiezh, mar karit. Diouzh maz eo an natur denel un damskeudennadur eus an natur doueel, triel evelti, ez eo perzhiek e nevedelezh houmañ ; else, ne c'haller ket stekiñ outi hag he daskemm ; ha rak-se ivez ez eo an Iliz ken strizh war dachenn ar beved, ha peurgent, hini ar rev a zo mammenn ar beved, pe hini an tiegezh a zo moul speredel pep den o tont d'ar bed.

Er meizadur kristen eus Doue ez eo an dragouezelezh merk-dianaout ha merk-diforc'hañ pennañ an doueelezh, muioc'h eget an hollc'halloudegezh a zo debarzh piaouel Doue an Tad (par eo an tri hiniad an eil d'egile, met n'int nakevatal na keveskemmadus an eil ouzh egile). Bez' ez eo an hollc'halloudegezh hec'h-unan, da gentañ, kentodegezh e krouidigezh hag en urzhiadur an hollved, Doue an Tad o verkañ bevennoù an egorennoù miret d'ar re zibabet ha d'ar re zaonet : adal maz eus rezidoù o kenhanvout n'eur ken evit komz a hollc'halloudegezh rik ha dizave. Ur galloud-eilkrouiñ o deus ar grouadurion war ar grouadelezh hec'h-unan, a-hed un "Istor" amzerel a zo, da gentañ, un aprou.

Tu a vefe da gas pelloc'h ar plaenadur-mañ eus keal an Doue kristen. A-walc'h hon eus lavaret evit diskouez n'en deus ar c'heal-mañ netra da welout gant hini Voltaire, Robespierre pe Adolf Hitler ; ar re-mañ a rae ivez dave d'ur Peurvoud digalon, ezvezant, diseblant, noualant, mennet da zilezel e ved da virviken etre krabanoù ar rouaned-doueed a ra o renkoù war an douar-mañ.

H.K.

.....

Moulet gant "Keneiled Imbourc'h"

An atebeg : Y. Ollivier

CPAPP : 50 015

